

# AL LANV

NIVERENN 3

6 LUR

MAE / MEZHEVEN 1980




## taolenn

PENNAD-STUR	2
EUSKADI	3
BRO-INDIA HA GANDHI	7
PRIZONIDI IWERZHON	11
GWIRIOU MAB-DEN	14
PLOGO	17
HAG HOR YEZH ?	19
FLEURIOT	23
LABOUSED GANT TUDU	26
BRAVE NEW WORLD	27
LAGADLEMM	29
IMPALAEREZ AR BLUES	30
DIWAN	31
GERIOU-KROAZ	32

## CHOARIOU GWADEK E KABOUL

**iwierzhon:  
3000  
prizoniad  
politikel**



## pennad-stur

AR VAZH HAG AR VEEH !

Pilpous, klufan, marc'h gevier anezhañ, Jiskar a zeu gantañ prezegennoù bray war an demokratelezh frankizour ha padal e kas war-un-dro e C.R.S.ed, e ar-cherien, e barachutisted hag e justis da enebñ ouzh youl ar bobl e Flogo.

Ouzh piv e reer goap en ur gomz eus minorelezhioù e Flogo, ouzh piv e skoer pa ya kannaded Vreizh da glask an diviz e Pariz a-zivout an Tanio ? Piv a vez o fougasiñ kement war ar radio hag an tele divar-benn ar "plañioù" POLMAR hag ORSEC, piv a vez dalc'hamat o kentañ kozh bidennoù da douellañ ar bobl ? Piv nemet ar gouarnamant bourc'hiz gall a zo die'houest da sevel a-enep lezioù ar c'hompagnunezhioù petrol lies-vroadel, a zo die'houest da dremen hep ar c'hreizennoù nukleel.

N'eo ket dav chom da gontañ ar skandalioù, n'eo ket dav chom da sellout pell ouzh politikerezh diavaez ar vro da verzañ da biv eo gwerzhet. N'eo ket dav prederiañ pell evit kompren emañ ar stad gant hec'h arme, he follis hag he justis o prientiñ deomp ur vray a stad poliser. N'eo ket dav kennebeut chom da glemmichal ha goulenn dalbec'h digant ar stad ur politikerezh reishoc'h e-keñver hor pobl, e-keñver hor bro. Interest Pariz n'eo ket hini Breizh, interest Pariz eo sevel kreizennoù nukleel er Frañs don, ober eus Breizh un dachenn arme, un dachenn douristelezh, ur park evit al loened doñv. Petra vern ma vez saotret ar mor, an sod, al laboused da vil viken ma c'hell an douristed ebatal e peoc'h e-pad an hañv ? Petra vern ?

Arabat goulenn digant Pariz eta ober politikerezh Breizh, ne c'hell ket en em zistrujañ memestra ! Arabat fiziout e politikerezh vourc'hiz an tu dehou gwerzhet reor ha roched d'o mistri e Pariz, na kennebeut e reoù an tu kleiz gall a chomo atav Breizh evito un trap mouezhiou a eil renk. Arabat d'ar Vretoned goulenn aluzon o gwirioù, kemeromp ha kemeromp diouzhtu penn an hent davet an emrenezh hag ar sokialouriezh.

**EIL FESTIVAL DIWAN E PLOVEILH.**  
e Kastell KERAMBLEIZ, an 18, 19, 20  
a viz Gouere

Kuzul-skoazell DIWAN PLOVEILH a gaso en-dro e eil festival bras muzik ha kan e Kastell KERAMBLEIZ e PLOVEILH, an 18, 19 hag 20 a viz Gouere 1980.

Ar program zo bet savet evel-hen :

- GWENER 18 da 8 eur noz, war blasenn Ploveilh : C'hoariva (teatr) breshoneg gant Strollad ar Vro Bagan : NOMINOE OE ! Pezh-o'hoari savet gant Jakez RIGU eus Lotel o kentañ trec'h Nominoe war Franked Charles ar Moul hag a segasas o frankiz d'ar Vretoned er bloavezh 845.

Goude ar pezh : FEST-NOE gant ar strollad SAK-A-BENN, sonerien ha kanerien eus ar vro.

- SADORN 19 da 9 eur e Kastell KERAMBLEIZ :
  - . Gweltaz ar FUR
  - . François BERANGER
- SUL 20 adalek 2 eur d'abardaez e kastell KERAMBLEIZ
  - . DJAMEL ALAM (Muzisian Berber)
  - . AN TRISKELL
  - . YOUNN GWERNIG
  - . BILL DERAIME (blues)
  - . BAGAD KEMPERLE
  - . GLENMOR HA KATELL
  - . KEVIN BURKE ha MIKAEL O'DONNAN (Iwerzhon)

D'ar sul d'abardaez e vo animatourien a raio war-dro ar vugale.

Standoù e-leizh a vo kavet war an dachenn gant peadra da zebrñ ha da evañ.

AL LANV CFPAP : 62602  
Relouenn diskleriet hervez Lezem  
mezheven 80

Moulet e Bretagne Ateliers,  
146, st. An Oriant, ROAZHON  
Rener : Padrig An Habask

Koumanantoù : - 30 lur (boutin)  
- 50 lur (skoazell)

Da :  
AL LANV, 7 st. ar rektor P. Henry,  
35000 ROAZHON.

## euskadi

Goude ar referendom war an emrenezh d'ar 25 a viz Here tremenet hag ar vouezhiadeg gentañ da zilenn kannaded parlament Euskadi e teu war wel frammoù kentañ an emrenezh nevez. Savet zo bet ur gouarnamant euskarat, Carlos Garaikoetxea e penn anezhañ ; harpet eo ar prezidant gant ur c'huzul, o-daou dindan kontrol ur parlament dilennet gant mouezhiadeg an holl. Galloudoù bras a zo gantañ war dachennoù ar meraan rannvroel, an deskadurezh, ar c'hedskor, an douristelezh hag an dareprediñ dre an hentoù, ar mor, ar stered hag an cabl. Chom a ra evelkent ar bolis, ar politikerezh diavaez, an justis, an arme, an harzoù hag ar moneiz etre krabanoù pacted Madrid. Euskarekaet eo ivez ar vuhez pendeziek, gounit a ra tachenn an euskareg lakaet bremañ da yezh ofisiel evel ar c'hastilhaneg, lakaet e vez war wel an Ikurrina, banniel Euskadi, e pep lec'h, dont a ra dekmilladoù a dud da zevezh ar vro, an Aberri Eguna. Daoust ma weler an euskarekadur e barr e vleufv er straedoù gant arouezioù a bep seurt ha war an tee-shirtoù n'eus netra diskoulmet du-hont rak kenderc'hel a ra dizehan ar stourm armet etre nerzhioù ar stad hag an E.T.A. Ne ya ket e-biou ur sizhurvez hep tagadenn, na walldaol, na krogad armet. Dreist d'al lezennoù nevez, parlament hag all, dreist d'ar strolladoù politikel hervez lezenn e talc'h e kendalc'h ar brezel etre ar stad spagnat hag an E.T.A. (mili dreist-holl). Met perak 'ta n'eus ket tu en Euskadi da dremen eus ar Frankouriezh d'an demokratelezh vourc'hiz dre hentoù lezennel e-giz ma felles da Suarez ?

Ur vro binvidik eo Euskadi, an hini binvidikañ zoken eus Bro-Spagn. Gant ar glaou, an houarnerezh, an injinerezhioù pourvezañ, ar chantieroù a vor, ar bankoù bras eo deuet Riscaya, Guipuzcoa ha nevezik 'zo Alava ha Navarra da vezañ pinvidikañ proviñsoù Spagn - 9 % eus ar P.N.B. spagnolek, 16 % eus an eziporzadurioù, 80 % eus ar mekanikoù-ostilhoù, 15 diwar an 50 brasañ chantier a vor, 3 eus ar bankoù brasañ, ar gounid bloaziek uhelañ dre benn den evit Bro-Spagn,

ar beveziañ-boued uhelañ, ur boblañs kreizennet ha kariaekaat, war-gresk fonnus ha liesorin gant enbroidi deat di a zekmilladoù abaoe penn-kentañ ar c'hantved

Ya, met krog eo ar melezour da frailhañ abaoe 1977. Gant gwashadur stad an traoù war an dachenn etrevroadel, daoust da zaou zigresk war ar peseta, hag ivez gant an diouer a bostadurioù ha koshadur ar mekanikoù kenderc'hañ eo bet skoet a-benn injinerezh gouner Euskadi. Gant ur c'hresk mann, un dilabour spontus atav war-gresk n'eo ket digoumoul dazont armerzhel ar vro, dibochiñ a reer ha chom hep postañ.

Chefchet eo bet ivez an troc'hoù renkadet a oa e derou ar c'hantved. Ar renkad kouerel hag ar renkadoù etre a oa bet skoet en o henvoazioù kouerel ha kristen e fin an naontekvet kantved o deus kroget da ersaviñ krenn er bloavezhioù tregont ouzh efedoù fall an dispac'h gresantel. Ne stourment ket avat ouzh ar re a oa pennabeg ar c'horvoadur hag ar proleteradur. Gant ar batroned vras spagnolek a orin euskarek e stourment zoken, en anv teoriennoù broadelour strizh ouzh an tu kleiz a zifenne ar vicherourien enbroad (kreñv-tre e oa en o-zouez) met ne blede ket kalz gant kudennoù ar yoc'hoù micherour ha kouerel euskarek. Gant ar Frankouriezh eo bet chefchet stad an traoù p'eo en em gavet an tu kleiz hag ar vuhez euskarek bannet asamblez e-maez al lezenn. Evit ar wech kentañ e waked war-un-dro ouzh ar sokialouriezh, ar vicherourien hag an euskareg, en ur glask spagnolekaat ar vro ha dieuskarekaat anezhi dre heg. Diwar se eo diwanet ar goulennoù groñs hollek kentañ, war-un-dro broadel ha sokial er bloavezhioù 1970. An emglev nevez-se a zo bet diskouezet splann d'ar bed a-bezh da-geñver prosez Burgos e 1970 : kenzifennet e oa evit ar wech kentañ an arc'houlennoù sokial ha broadel gant al labourerien euskarek, al labourerien enbroad hag ivez an dud e karg eus ar renkadoù etre lec'hel.

Ouzhpenn dek harz-labour politikel bras etre 1970 ha 1978. An E.T.A. a zegas ar feulster e marc'hata ar goprou, ar renkad micherour a sav he fenn a-enep d'an talmoù labour gwashoc'h-gwashoc'h hag a-enep

# KOUMANANTIT

AN DAOU NERZH PENNAÑ

A-us da c'halloud ar strolladoù e chom sonn neoc'h an daou nerzh pennañ, hini gouarnamant Suarez hag hini an E.T.A.

Diouzh un tu e klask eta gouarnamant kreizelour Madrid (an U.C.D.) en em harpañ war ar strollad broadel Euskarek, ar P.N.V., kreñv-tre er parlamant euskarek gant e drec'h bras er votadeg diwezhañ. Klask a ra eta Suarez lakaat ar P.N.V. da zifennour ar brizhstatud a emrenezh aotreet gant Madrid. Kement-se a zo ur gadoniezh bet amprouet dija, tremen a reer da frankizour en ur lakaat tout ar bec'h war chouk ur strollad eus ar vro. Frouezhus eo bet gant ar P.S.O.E. a oa bet kendivizer Madrid evit diazezañ ar C.G.V., kuzul meur euskarek chomet an doare kambur tasman. Gwanaat, uzañ ar P.N.V. a ra ar stad en ur gemer anezhañ da zivizer nemetañ en Euskadi, o lakaat anezhañ war-un-dro da bennkaoz ar gwallod a freuz ar vro, an emrenezh izil ha mof hep Navarra, an enkadenn armerzhel hag an dilabour. Ar politikerezh-se koulskoude, pell a wanaat ar vroadelouriezh euskarek a greñva an eskell pellañ anezhi, an E.T.A. mili hag an E.T.A. poli mili.

An E.T.A. mili ha poli mili a ra gant ar feulster evit lakaat ar gouarnamant da varc'hata ; n'int ket bet evit tizhout avat pileroù ar Frankouriezh - unelezh vroadel, perc'hentiezh brevez, elevez an iliz - E-tal an daou nerzh-se ha kaset-digaset ganto ar strolladoù politikel a glask merañ ar vro dre an hentoù lezennel hep gallout gwech ebet dont da vistri war ar jeu.

AN TU KLEIZ SPAGNAT

Da lavarout eo ar P.S.O.E. dreist-holl rak n'en deus ket tapet ar P.C.E. kaout kalz a vouezhoù er votadeg dremenet. Ar P.S.O.E. eta gant e rann diabarzh emren ar P.S.E., strollad sokialour Euskadi, a zo bet ur strollad bras er bloavezhioù 70 betek 1977/1978, mont a ra bremañ war zis-leberif. Fiziañs ar bobl en doa da gas da benn o program sokial ha broadel. Mel-loù fazioù en deus graet ar P.S.E. avat en ur sevel a-du gant Madrid da sevel ar C.G.V., ur furukin a zael n'en deus bet biskoazh tanfoeltr galloud. Dre n'emañ a-du gant linenn bolitikel ar strollad bras e vez chaletoc'h gant e bolitikerezh spagnat eget gant yoc'hoù Euskadi, en deus asantet da emglev ar batroned gant an U.G.T. (sindikad doare C.G.T. Bro-Spagn) ha da statud nevez al labourerien. En em

AR STROLLADOÙ POLITIKEL PENNAÑ

STROLLADOÙ ABERTZALE (brogarour)

- P.N.V. : strollad Broadel Euskadi (demokrat-kristen)
- H.B. : Herri Batasuna (kevre emrener tost ouzh E.T.A. militar)

STROLLADOÙ SPAGNAT

- P.S.E. : Strollad Sokialour Euskadi (rann eus ar P.S.O.E.)
- P.C.E. : Strollad Komunour Euskadi (rann eus ar P.C.E. spagnonek)
- U.C.D. : Unvaniezh ar c'hreiz demokratel (strollad ar gouarnamant)
- A.P. : Emglev Poblek (tu dehou pellañ) Frago Iribarne e penn anezhañ

AOZADURIOÙ DISPAC'HEL

- E.T.A. : Euskadi Ta Askatasuna (Euskadi ha Frankiz) 31 a viz Gouere 1959. Luskad sokialour euskarek da bal dezhañ dieubif ar vro ; rannet e div gostezenn war-lerc'h nouspet disrann e-pad e c'hwec'hvet kendalc'h : E.T.A. (m) : E.T.A. militar a gendalc'h gant ar stourm kroget ouzh ar faskouriezh gant an hevelep doareoù, ar c'hresk dibaoez gwalldaolioù/gwas'kerez.

- E.T.A. (pm) : E.T.A. politico militar. Chefchet en deus heñchadur e stourm hervez ar cheñchamantoù degouezhet war-lerc'h marv Franco. E-pad e seizhvet kendalc'h (1976) e voe rannet al luskad daou dal-benn, unan anezho armet a zalc'h an anv E.T.A. poli mili hag egile a zo un talbenn politikel e stumm ur strollad dizalc'helour ha sokialour, an E.T.A. (strollad evit an dispac'h euskarek, Eusko Iraultzeko Alderdia) bet lezennet-kaet d'an 18 a viz Genver 1978.

KOMANDOIOÙ EMREN

Luskad deut war-wel evit ar wech kentañ d'ar 27 a viz Here o lashañ ur stourmer sokialour. Pev ar gwalldaol-lashañ a zo da lakaat war o c'hont abaoe.

droc'het eo ivez diouzh an dud en ur sevel garv a-enep an daou E.T.A., en ur c'houlenn digant Madrid stourm ouzh ar sponterien, en ur c'hervel da grouidigezh un talbenn enep-sponter. Gant mouezhiadeg an 9 a viz Meurzh eo bet gwelet splann kiladenn ar P.S.E., kollet en deus un drederenn eus e vouezhoù, dre benn ma n'en doa ket labourer da embann al liamm a zo etre kudennoù sokial ha broadel Euskadi.



AR STROLLADOÙ EUSKAREK

Ar P.N.V. e-unan n'en deus ket ul linenn bolitikel eeun, diouzh e renerien ha diouzh doareoù ar galloud e vez. Daoust d'ar fizians vras roet dezhañ e votadeg an 9 a viz Meurzh, daoust dezhañ drec'hel ar galloud bremañ er gouarnamant euskarat gant o Lendakari Carlos Garaikoetxea, en deus ar P.N.V. da zougen samm ar marc'hata gant ar stad spagnolek, hini dilez Navarra hag hini an asant d'ar statud diglok ha re zister. Reuz diabarzh a oa soken er strollad a-raok ar vouezhiadeg diwezhañ, lod a felle dezho mont da gaout strolladoù dichekoc'h o doareoù ha lod all a felle dezho chom hep mouezhiañ. Dias eta sturiañ ur strollad en deus graet e vad hag e wall war-un-dro eus c'hwitadenn an U.C.D.

da rannidigezh ar gounid. Labourerien ar maezioù, int ivez, a dro da broleterien dindan yev trustoù al laezh, mont a reont da greñvaat al luskad dispac'hel. Memes renkadoù etre o doa tennet gounid eus kresk ar bloavezhioù 60 a zo tizhet gant an enkadenn hag a grog da stourm pa n'eus disoc'h ebet d'an arc'houlennoù broadel. Tarzhañ a ra ar freuz e 1976. Statud al labourerien, degemeret gant ar C'hortes d'ar 7 a viz Kerzu 1979 a zo distaollet e-pad an harz-labour brasañ a zo bet en Euskadi abaoe 40 vloaz, skoaz-ouzh-skoaz e kerzhe unanet al labourerien evit o gwirioù sokial ha broadel.

Gant hirvidigezh ar stourmoù renkadel ha broadel ha garvder ar gwaskadur faskour e oa dibosupl-krenn tremen eus an diktatouriezh d'an demokratelezh vourc'hiz hep bec'h. Bev e-touesk tud ar bobl e oa goanag an demokratelezh goulnennet gant strolladoù bras an ebebrezh spagnat e 1975 ha 1976. Setu ar ster a zo gant froud ar votadennoù en Euskadi, tro ha tro evit ar P.S.O.E., ar P.N.V., ar strolladoù broadelour pellañ, gant an tuadur d'an divotif pe d'ar feulster.



ARAOKADENN AR VROADELOURIEN

VOTADEG PARLAMANT MADRID  
(1 a viz Meurzh 1979)

VOTADEG PARLAMANT EUSKADI  
(9 a viz Meurzh 1980)

strollad	mouezhioù	kannaded	mouezhioù	emdroadur	kannaded
P.N.V.	275 292	7	350 283	+ 27,24 %	25
H.B.	149 635	3	152 162	+ 1,6 %	11
E.E.	80 097	1	90 064	+ 12,44 %	6
P.S.O.E.	190 325	5	130 543	- 31,37 %	9
P.C.E.	45 893	-	37 051	- 19,26 %	1
U.C.D.	168 607	5	78 310	- 53,55 %	6
A.P.	34 026	-	43 853	+ 28,2 %	2
divotif	542 000		652 000	+ 20 %	

Herri Batasuna, kevre-talbenn a-du gant an E.T.A. mili, a nac'h reif an disterañ sikour d'ar re o deus marc'hataet gant ar gouarnamant spagnat, asantet da droc'hañ Navarra diouzh ar peurrest eus ar vro, asantet ivez e vefe dav da rener ar gouarnamant euskarat, Carlos Garaikoetxea, bout anavezet gant ar B.O.E. spagnat (levr ofisiel) da lavarout eo soublañ dirak ur vammlezen spagnat dinac'het gant Euskariz. Herri Batasuna ha K.A.S. (Kevre sokialour brogar) a zo diazezet mat e poblañs Euskadi, er renk micherour euskarek. Kontrollif a ra al L.A.B.ou, anezho sindikadoù an tu-kleiz abertzale (brogar), asamblez gant Euskadiko Eskerra n'eus nemet ar bihanniver gantañ, hag o deus ul levezon vras war rannoù a-bouez eus bed al labour. Gant e c'halv da chom hep votif er referendum hag ar politike-rezh dichek a ren ouzh nerzhioù ar gwas-kerezh en Euskadi war-un-dro gant e bouez e marc'hata ar gozroù, e chom an E.T.A. militar hag e gostezenn bolitikel Herri Batasuna un nerzh divrall, war-gresk er votadeg diwezhañ, a dro o selloù daveti izili rann startañ hogen henvoazelañ ivez ar P.N.V.



Euskadiko Eskerra hag E.T.A. poli mili, int, a glask kentoc'h kemer perzh en diviz hep koll nerzh o rann armet hag o nerzh enebif ha burutellañ. Lavaret o doa votif ya er referendum war an emrenerezh hag ur mell brud o deus tapet abaoe en ur lakaat da darzhañ ur tuzeenn enep-tank e diabarzh hag en ur c'hervel gant H.B. d'an harz-labour a-enep statud al labourerien d'ar 7 a viz Kerzu. Kemer perzh en un doare abegus a fell dezho ha deut int madik a-walc'h a-benn. Tapet o deus lod eus mouezhioù ar P.S.E. a drugarez d'o linenn bolitikel termenet-mat. Estreget ar vicherourien euskarek a vot evito bremañ rak deut int a-benn da ledanaat o levezon d'ar vicherourien sokialour enbrot.



Brezel dizehan eta etre Madrid hag an E.T.A., youl ar gouarnamant da ziazezañ an demokratelezh vourc'hiz hag da gontrollif war-un-dro pinvidigezh Euskadi, politikerezh treuzvarc'had ar P.N.V. a greñva an eskell broadelour pellañ setu darn eus an elfennoù a ra gwirvoud Euskadi hiziv. Krennebadurioù spontus a zo eta etre youl ar gouarnamant kreiz spagnat da reif ur frankiz dindan evezh da Euskadi ha youl ar vroadelourien da gaout ur frankiz di-harz, etre youl ar batroned da gennañ gounid diwar-goust al labourerien ha youl ar vicherourien da berc'hennañ ar mekanikoù kenderc'hañ, da eilpenañ lezennoù ar gounid ha da zistroadañ ar renkadren vourc'hiz euskarek pe get. Daoust da gomzoù flour ar gelaouerezh vras war ar radio hag ar skinwel e kendalc'h garv ar stoum broadel ha renkadel en Euskadi, ar stoum hag ar brezel...

# dieubidigezh india

Er seitekvet kantved e krogas da vont war he diskar impalaouriezh ar Vogoled vras, gant he c'hêrbenn e Delhi. Endev edo Breizhveuriz war al lec'h. E 1600 e oa bet krouet ganto Kompagnuezh Broioù India, dezhi palioù kemerzhel-rik. Aloubif ar vro ne oa ket o fal, hogen sevel kontlec'hioù (Madras, Calcutta, Bombay h.a...) Ebarzhet e veze lien-kotoñs, traoù seiz hag ispisou. Bro-C'hall a oa dezhi un nebeut kontlec'hioù ivez, met gant sinadur feur-emglev Paris e voe karnetaet beli Breizh-Veur war ar vro-se...

A-hed ar c'hantvedoù e vos kadarnaet kement ha ma c'helle bezañ, ha n'eo nemet gant ul lazhadeg euzhus e miz Ebrel 1919 ma voe broudet Gandhi da gemer perzh en emsav-dieubif India. Droug a oa savet er vro pa oa bet embannet e miz C'hwevrer 1919 al lezennoù Rowlatt o heuliañ mod-se al lezennoù brezel o vihanatao gwirioù keodedel ar poblañs...

Feuket e voe Gandhi gant seurt nevezinti, ha kinnig a reas kerkent paouez a labourat dre-holl er vro evit gorrekaat lañs an armerzh. Buan-tre e voed kroq gant an harz-labour hollek, ha ret e voe d'ar velestradurezh saoz asantiñ dezhañ. E-giz distro-gwall e voe paket Gandhi war-un-dro gant daou bennden eus ar c'hendalc'h. Gouezet ganto an nevezinti-se en em gavas neuze an Indianed er straedoù oc'h aloubif al lec'hioù-pobl ha meur a di-bank, oc'h ober o stal d'o implijidi ken ez eas da anaon meur a hini. Gourc'hemennet e voe raktal gant ar gouarnamant difenn pep dibunadeg, pep displegadeg ha bodadeg e kêr.

Kaset e vez gant ar c'honorol Dyer ur major dre straedoù kêr da embann ar c'heloù-se, hogen ne vez komprenet gant hini ebet pe dost. Setu perak, d'an 13 a viz Ebrel 1949 e tered miliadoù a baotred hag a verc'hed war-du ur blasenn hirgarrezek gronnet gant mogerioù uhel, galvet d'ur vodadeg vras da beder eur d'endervezh. War-dro ugent mil a dud a zo o selloù gant aked prezegennoù an dispac'herien.



Padal ne glevont ket boubou un nebeut kirri houarnwisket o tostaat goustad ouzh ar blasenn dre straedoù nes. A-daol-trumm e klevet fraezh an tennoù o strakal. Krog eo ar fuzuilhadez. Evel just e pennfoll an engroez... 375 den a zo lazhet, 1137 a zo gloazet. Atav e talc'ho soñj pobl India eus al lazhadeg-se ; broudañ a ra an darvoud-se Gandhi da stourm en ur gantañ war nerzh ar bobl. Prechiañ a ra an nann-feulster ha skoazellet gant mi-liadoù a ziskibien emañ e soñj blienian ar bobl en-dro d'ar sevenadur hengoumel Hindouat. E venveg brezel eo ar c'harr-nezañ (bemez e vez o nezañ un nebeut eurvezhioù-pad). Emañ o chom e leandi (ashram) bihan Sevagram gant e wreg, e ziskibien hag un nebeut tud sakr (difen-net stekif outo). Rebechoù en deus a-berzh ar re-mañ... Goude ar c'hentañ brezel-bed ha lazhadeg Amritsar ez a an traou war washaat dre ar vro. Mont a ra ar prizioù war-gresk hag en ur stad reuzedik emañ ar bobl a vez 85 anezhi o vevañ war ar maez. Brevet dindan bec'h an taosoù e varv kalz anezho gant an naon pe gant klievedoù liesseurt. Ouzhpenn se ez a da get an artizanelezh gant an enbroadennoù a zanvez estren. Esperañs bevañ an Hindouat a zo 23 bloavezh e 1911 ha 27 e 1931...

Hogen ouzhpenn an dever da vountañ ar Saozon er-maez eus India, Gandhi a zo gantañ kudennoù a ziabarzh-vro da ziskoulmañ. ha da gantañ-holl pouez ar Vuzulmiz, dezho boazioù ha kredennoù disheñvel diouzh reoù an Hindoued. Ur gudenn wirion eo hag ober a ra ar Saozon o mad anezhi evit mirout ouzh ar bobl d'en em unañ.

Evit sioulaat an traou e tenn ar gouarnamant saoz e lezennoù Rowlatt gwallvru-det. En o lec'h ec'h embanner ar "government of India Act" (Skrid-feur gouarnamant Bro-India) e 1920. Mod-se e vez roet d'ar gouarnamant-kreiz an "aferioù miret strizh" (an arme, an arc'hantouriezh, ar bolis) tra ma vez graet war-dro al labour-douar, ar geennadurezh h.a. gant pep a ouarnamant rannvro. E gwirionez n'eus bet kemmet netra da vat dre m'o deus ar besroue hag ar ouarnerien ur gwir da enebiañ (gwir veto) war divizoù ar bodadegoù e karg eus al lezenñ.

Nebeut a amzer goude, Gandhi, dilennet rener ar c'hevre evit an emrenerezh a gemenn stourm an "disentidigezh ouzh al lezenn" da bobl India ha war-un-dro d'ar besroue. Hemañ ne ra nemet mousc'hoarzhin d'ar pezh a zo hervezañ luaf dezo an dezioù luaf. Ne vern koulskoude : kregif

a ra ar studieren da zilezel ar skolioù, an dud e karg da gas en-dro o medalennoù hag o zeulioù ; chom a ra diseblant ar querien pa vez lamet diganto o arrebeuri hag o saout en o atantoù ire m'o deus nac'het paeañ o zailhoù. Kuitaat a ra ar c'hèrioù Hindoued a villadoù evit mont da brechiañ ar "satyagraha" (an disentidigezh) war ar maez. Dre-holl war blasennoù ar c'hèriadennoù ez eus tantadoù o teviñ, tud oc'h en em ziskañ hag o teurel en tan o zammoù dilhad "made in England".

Koulskoude n'eo ket tizhet an emrenerezh. En ur ober daou vloaz netra n'eo aet war wellaat, ar c'hontrol an hini eo emichañs. Enebadennoù a sav un tamm e pep lec'h. Tud a-du gwechall gant menoziou Gandhi a stag d'ober al lu gantañ ha fellout a ra dezho ober gant al feulster a-enep ar Saozon. Ar re-mañ, dre urzh ar besroue Lord Reading a laka Gandhi en toull-bac'h d'an 10 a viz Meurzh 1922. Tremen a raio ennañ c'hwec'h vloavezh diwar setañs ar varnourien. Er-maez, e tro an traou da fall etre Hindoued ha Muzulmiz. Muzulmiz a grog da lazhañ ar saout sakr d'o debriñ tra ma vez sonet trompilhadegoù war dreuzoù ar moskeennoù gant Hindoued. Bewech ez a tud da anaon gant darvoudoù a seurt-se, droch evit doare. Kaer zo da c'h/Gandhi yunañ ha klemm, ne vez ket klevet ar gentel.

Mont a ra da voged emsav an disentidigezh hag ober a ra ar gouarnamant e vad eus ar skuizhez-se evit terrif an aotreoù war an armerzh en doa roet un nebeut bloavezhioù a-raok. A 1927 e vez uhelaet gantañ feur-eskemm ar roupi (pezh a dalv kement ha lakaat an ebarzhadurioù da zigreskiñ) hag aotreet gantañ prizioù spletusoc'h war dir Bro-Saoz. A-walc'h eo d'an Indianed da enebiañ ha da reiñ lañs nevez d'an emsav. Goulenn a ra an emrenerezh peurglok (purna swaraj) daou bennden eus tu kleiz ar c'hendalc'h, Iawahlrat Nehru ha Subhas Chandra Bose. A-du emañ Nehru gant Gandhi evit ma vefe dieubet ar bobl dre an nann-feulster.

Diouzh e du e vez Gandhi o klask adarre un emglev a genlabour gant ar besroue nevez, lord Irwin. Diskoulm ebet ne zeu war wel... D'an 31 a viz Kerzu 1929 ez eo goulennet grofs an emrenerezh gant ar c'hendalc'h hag e brezidant nevez Nehru. D'ar 26 a viz Genver 1930 ez eo dispaket gant Gandhi banniel nevez India, ha lidet gantañ kentañ devezh an dieubidigezh... Adkregiañ a ra an oberoù a zisentidigezh ouzh al lezenn. Kemer a ra Gandhi penn e hent dre ar maezioù d'an 11 a viz Meurzh 1930. War vrasaat buan ez a an engroez

ouzh e heuliañ, goude dezhañ bezañ tremenet e kement bourc'h a oa war e hent. A-benn ar fin ez erruont e-tal ar mor e Dandi. Mont a ra ar Mahatma war-raok da zastum ur vozad holen laosket aze war ar reier gant ar gwagennoù. Fellout a ra dezhañ, mod-se, tamall dirak an holl an taosoù saoz war an holen. Meizet eo bet an dra-se gant an engroez : Bro-India hec'h-unan a yelo da gerc'hat he holen e-barzh ar mor. Boikotet e vez ar stalioù a werzh danvez estren ivez. E-giz distro-poan a-berzh ar Saozon e vez lakaet en toull pennoù an emsav, da lavarout ez, Gandhi ha Nehru, tra ma vez skourjezet ha bazhataet ar re all. Ur wech c'hoazh ez eo dieubet Gandhi gant ar besroue Lord Irwin, en e soñj dezhañ en em glevout gant ar mahatma evit kavout un diskoulm da vat, en ur dremen hep an disentidigezh ouzh al lezenn, evel just. Mont a ra kuit da Londrez da gendaolañ gant kannaded ar Vuzulmiz ha re ar Saozon. Adarre e vez pleustret war an hevelep kudennoù ha diagent hogen, evel boaz, ar c'hudennoù a relijion a vir ouzh ar berzhidi d'en em ober kenetrezo. Goude pevar mizvezh tremenet e Bro-Saoz e teu Gandhi da India en-dro. Aet eo an eneberezh gouzañvus da zisplijadur dre forzh ober. Nehru a zo bet lakaet en toull adarre, ha Gandhi, a-gevret gant ouzhpenn kant mil Indezad a heuilh anezhañ nebeut a amzer goude. Hep e bennoù e hafval ar stourm a zisentidigezh bezañ damvary. Met unvaniezh ar bobl a zeu da vev buan-tre, pa vez embannet gant ar c'hazetennoù emañ Gandhi o vont da gregiañ gant ur yun betek ar marv, evit enebiañ ouzh al lezennoù a vir ouzh an dud sakr a votiñ an dilennadegoù... An trec'h politikel-se a zo an hini diwezhañ gounezet gant Gandhi a-raok ar brezel, rak diwar neuze e vo ret dezhañ reiñ lec'h da Nehru ha da strollad "ar re mall warno".

D'ar mare-se, war-dro 1935, e klask Bro-Saoz gant ur c'henreizhadur kevredel nevez, aozañ tamm-ha-tamm emrenerezh da zont India. E 1937 ez eo gounezet ar muiañ-niver gant ar c'hendalc'h e-doug ar mouezhiadegoù. Ar re-se a ziskouez war-un-dro ur gudenn a-bouez n'eo ket bet diskoulmet c'hoazh ; hini ar Vuzulmiz an hini eo. 5 1/2 hepen eus ar mouezhioù a zo aet gant kevrenn muzulmat Jinnah, ha nac'hañ a ra hemañ kenlabourat war roll-labour ar c'hendalc'h. Kinnig a ra krouiñ ur stad dieub evit Muzulmiz. Jinnah a oar a-walc'h n'eus ket tu da gant milionad a Vuzulmiz bezañ trec'h da dri c'hant milionad a Hindoued da gefver dilennadeg pe zillennadeg. Dirak izili ar c'hendalc'h e c'houlenn ma vefe savet en he flomm ur

vroad dizalc'h a vefe anvet Pakistan (pak = glan ; "penn-kil-ha-troad" kentoc'h, dre-se e vefe ar Pakistan stad ar Vuzulmiz penn-kil-ha-troad). Leun a skoilhoù a sav diwar neuze war hent an emrenezh, ha gant an eil brezel bed oc'h ober e reuz en Europa, setu Bro-India oc'h en em gavout liammet gant Bro-Saoz, dre heg evel just, evit stourm a-enep ar C'hermaned. Daoust d'an darn vrasañ eus an Indianed bezañ nann-faskourien anezho, ne asantont brezelin nemet war an diviz ma vo prometet gant ar Saozon kuitaat ar vro e fin ar brezel. Ul ligan nevez a vleun : "Quit India" (Kuitait India). Adarre e vez riotet, tabutet ; un tri-ugent mil bennak a dud a-du gant menozioù Gandhi a vez toullbac'het. Ar marichal Wavell, o paouez bezañ anvet da vesroue nevez, leun a youl vat gantañ, a laka Gandhi ha Nehru da zont er-maez eus o zoull evit klask en em glevout ur wech c'hoazh. N'ouzont ket avat eo kroq an dizurzh da ren er vro dija ; n'eus netra diskoulmet evit pezh a sell ouzh kudennoù ar Vuzulmiz o vevañ e-touez ar muiañ-niver Hindouat. Kroq eo ar brezel-diabarzh endev : e rannvroioù 'zo ez eo rediet Hindoued da weañ o berrvroz diouzh ar c'hiz vuzulmat ha da ganañ pedennoù ar C'horan evel ar re all. Amañ hag ahont e vez laeret bugale e-leizh d'o badezif, dre heg, hervez lidoù an Hindouegezh ma 'z eo Indoued al laeron hag ar c'hontrol diouzh ma vez. Kêriadennoù a-bezh a vez diskaret pe devet. Evit sioulaat ar riotoù ez a Gandhi da lojañ gant un tiegezh muzulmat. Ober a ra e vad kevre Jinnah eus stad an traoù evit klemm ha goulenñ groñs ma vefe adstaget rannvroioù ouzhpenn ouzh an danvez Pakistan. A-benn ar fin e ra gouarnamant Labour Londrez e venoz da dennañ e lidoù eus India. Kas a reer Lord Mountbatten da gemer lec'h ar marichal Wavell ; kerkent hag erruet e kemenn ar besroue diwezhañ n'eo ket deut eno da ren war ar vro, met e fell dezhañ skoazellañ anezhi da vont dizalc'h. Un emglev a vez skoulmet en diwez : gronnet e vo India hindouat gant Pakistan ar C'hornog diouzh un tu gant Pakistan ar Reter diouzh un tu all. Jinnah a felle dezhañ ma vije aotreet un ode etre an div vroig, hogen nac'het e voe an dra-se outañ.

D'ar 14 a viz Eost 1947 e Karadu e vez lidet goul ar Pakistan frank gant Jinnah hag e bobl. Un tammig dreist d'an harzoù ez eo dispaket banniel India digabestr. Ehatoù ha gouelioù a bep seurt

a lak an div bobl da zisoñjal, evit ur pennad amzer, al lazhadegoù a zo bet abaoe meur a vloavezh. D'an 21 a viz Even 1948 e sko Lord Mountbatten etrezek Bro-Saoz, echuet gantañ e gefridi.

Kregiañ a ra ur marevezh nevez evit Bro-India hag an daou Bakistan. Leun a drubuilhoù e vo c'hoazh.

J.L. DEY

#### STAJ BREZHONEG WAR AR MAEZ E BRO-DREGER

Savet 'vo evit an eil gwech ur staj brezhoneg war ar maez gant kreizenn sevenadurel Lanuon, e-pad sizhunvezh kentañ miz Gwengolo, adalek ar sul 31 a viz Eost da noz betek ar sadorn 6 a viz Gwengolo. Digor 'vo d'an holl re a zo barrek da gompren ar yezh hep re a boan hag a oar kaozeal anezhi mat-avalc'h dija.

Plaset 'vo pep stajiad en ur menaj e lec'h e vo ret dezhañ labourat gant tud an ti ; lavaret 'vo bet d'ar venajerien komz brezhoneg hepken ouzh ar stajidi : evel-se e teuo tamm ha tamm gante brezhoneg evel ma vez kaozeet bemdez gant an dud war ar maez.

Ret eo gouzout e vo start a-wechoù al labour, met gounidus e pep keñver, rak bevañ e brezhoneg gant tud ur menaj 'zo dreist d'en em lakast da gaozeal ar yezh en ur stumm naturel ha da anavezout muioù buhez an dud war ar maez. Klasket 'vo ivez sevel ur veilhadeg pe ziv e-kerz ar sizhun.

Ar staj-se ne gousto kazimant netra deoc'h pa vo roet da bep stajiad boued ha lojeiz gant ar venajerien ha ne vo goulennet diganeoc'h nemet 50 L. evit bezañ enskrivet (an arc'hant-se a vo implijet evit paeañ an asurañs).

M'ho peus c'hoant ober ar staj, skrivit pe bellgomz evit goulenñ ur follenn-enskrivañ ouzh :

Soazig GRALL  
Res. La Frégate  
22700 FERROZ  
Pellgomz : (96) 23 33 42

## IWERZHON

### STOURM AR BRIZONIDI

E-doug ar bloavezh 1976 e tivizas ar gouarnamant saoz renet gant CALLAGHAN, mestr al Labour Party, ne vefe ket mui roet ar statud a brizoniad politikel d'an neb harzet goude un taol-arzqas bennak en Iwerzhon pe e Breizh Veur. Daou bal a oa gant an diviz-se. Da gentañ, un doare da ziskouez n'eus prizoniad politikel ebet e Bro-Saoz ha da c'houde lakaat paoz ar IRA da vezañ sellet outo evel muntreerien gant an dud ha gant al lezenn ivez. Setu direbech koustians ar Saozon : a-enep da vuntreerien an IRA emañ ar soudarded o stourm.

Adalek ar mare-se o deus ar brizonidi republikan kroget gant ar stourm en toull-bac'h evit kaout ar statud politikel nac'het dezho gant an alouber saoz. Kieran NURGENT a zo bet an hini kentañ o nac'h gwiskañ lifre an toull-bac'h. Bac'het eo NURGENT evit ar wech kentañ (17 bloaz e oa) e 1975. Chom a ra dek miz en toull. Kondaonet eo adarre, e miz Gwengolo 1976, da dri bloaz toull-bac'h. D'ar mare-se eo e nac'h gwiskañ al lifre, un doare evitañ da c'houlenñ ar statud politikel. Peogwir ne vez roet dezhañ dilhad ebet e vez noazh gant ur pallen war e gein. E-pad tri bloaz. Un nebeut devezhoù goude NURGENT e nac'h ur prizoniad all gwiskañ al lifre : Ned FLYNN. Ganet eo ar "Blanket Men" (Paozred o fallennoù).

Tri c'hant pevar-ugent emaint bremañ e kamp-bac'h LONG KESH o vevañ noazh gant pep a ballenn war e gein. Daou vloaz 'zo, e derou 1978, o deus ar brizonidi nac'het en em walc'hiñ ha mont d'ar privezoù. Bevañ a reont e-mesk ar c'haoc'h hag ar staot o flaeriañ. Dont a ra an evezhierien, maskloù ganto war o dremm, da lakaat dourennoù hag aezhennoù digontammus da strinkañ er c'hambroù. Digontammet e vez pep tra... ha pep hini, rak n'eus ket ar gwir da vont er-maez. Kleñvedoù kroc'hen o deus ha koulskoude ne vezont ket louzaouet. Gwarded H-Block LONG KESH (advet evel-se peogwir ez eus stumm un H gant ar savadurioù) a vez di-druet gant ar brizonidi republikan. Doa-

reoù a bep seurt o deus evit boureviañ anezho. Skoet 'vez warno, lakaet anezho da dremen dindan strinkadennoù dour berv ha dour sklas diouzitu goude, hep disoñjal an tredan eveljust... N'eus gwir ebet gant ar brizonidi (lenn, skrivañ, haleadenn hag all...) Dre ruzh e teont koulskoude a-benn da gas keleier.

Ar merc'hed ivez, e prizon ARMAH, o deus kroget gant an hevelep stourm. Div ha tregont anezho a vez dres evel republikaned LONG KESH. Ar gwir o deus koulskoude da wiskañ dilhad dezho o-unan ! Boureviet e vezont koulskoude gant ar warded pe ar qwarderezed.




War ar pezh a sell ouzh ar statud politikel eo sklaer politikerezh ar Saozon : ne fell ket dezho kilañ. Tri miz 'zo eo aet ar c'hardinal O'FLAICH da veladenniañ kam-bac'h LONG KESH evit an eil gwech, ha goude eo bet degemeret gant Humphrey ATKINS, Sekretour Stad evit kudennoù Iwerzhon. Divizout a reas heñañ o defe ar brizonidi ar gwir da vezañ gwelademet ur wech ar miz ha da ober embregerezh-korf un eur bemdez... Nac'het eo bet kesent-se gant ar republikaned. Ma nac'h ar gouarnamant saoz ar statud politikel eo peogwir ne fell ket dezhañ anzay ez eus 3000 prizoniad republikan en Iwerzhon hag e Bro-Saoz. Dre-se, e kuzh ar

gudenn bolitikel, haq e lak paotred an IRA war renk ar vuntreerien. Ar republikaned (ezed), avat, a gendalc'h gant ar stourm er c'hampoù evit adkavout o delle-zegezh ha war an dachenn evit skarzhañ an alouber er-maez.

" BIG BROTHER IS WATCHING YOU "

Met an alouber, eñ, a zo deut a-benn da sevel ur gwir bloc'h enep-republikan. Un tu eo brezel an Ulster evit an arme saoz da amproñ ar soudarded haq an armoù ha da wellaat pe da gemm hini pe hini hervez an degouezhioù. Evel-se, da skouer, eo bet krouet an UDR (Ulster Defense Regiment) evit kemer plas ar B-Specials, dek vloaz 'zo. Emouestlidi eo an darn vrasañ eus paotred an UDR. Ezel eo kalz anezho eus ar c'hostezennoù faskour (UDA pe UVF). Krouñ an UDR a oa un doare da strolañ an nerzhioù faskour en ur bagad-tagañ ofisiel renet gant ofi-



serien saoz a-enep ar republikaned. War zigreskiñ ez a bremañ niver an dud a gen-labour gant an UDR. Emichañs e soñj da lod anezho eo re wan ar bagad. Ar re zipitet a zo aet a-du gant an TARA, ur bagad-tagañ all, krouet e 1972 gant ur mignon feal da IAN PAISLEY, pastor protestant ha faskour brudet. Deuet eo an TARA da vezañ anavezet dre al lazhadegoù spontus o deus e izili kaset war-ark. Evit krefivaat nerzh ar strollad, emañ o paouez renerien an TARA enañ emglevioù gant John HUNDALL penn-bras an National Front ur strollad politikel anavezet mat en abeg d'e venozioù gouennelour ha faskour. Fellout a ra d'an dachenn-se "krefivaat ar stourm a-enep ar gomunourien en Iwerzhon hag e Breizh Veur"

Un arm efedus kenañ he deus lakaet an arme saoz da dalvezout en Iwerzhon an Hantnoz : an ordinator, añvet "Big Brother" gant Iwerzhoniz. E miz Genver 1976, dres arak e zilez, en doa divizet Harold WILSON penn-rener ar gouarnamant saoz aotreañ an arme da gaout sikour un ordinator evit kreizennañ kement diskleriadur diwar-benn an armoù, an dud harzet, ar c'hirri, an dud a oa diskred warno, hag all... Buan e teuas "Big Brother" da vezañ ur fichennaoueg efedus ha prim. Bremañ, pa vez harzet unan bennak er straed e vez lakaet kement diskleriadur war ar fichenn : anv, oad, ment, liv an daoulagad, anv ar vignoned, chomlec'h, labour, lec'h al labour, an doare da vont di, liv ar c'harr (pe ar marc'h-houarn) niverenn, liv an ti hag all, hag all... Savet e vez evel-se fichennoù war an neb a vez en Ulster ha buan e teu an diskred warnañ. Deuet eo an evezherezh da vezañ "crwellian", gwashoc'h marteze. Anzav a ra aes awalc'h ar Saozon o deus kemeret skouer war ar pezh a oa bet graet gant ar c'horonal TRINQUIER e Bro Aljeria un nebeut bloavezhioù 'zo... Met wellaat eo bet an traoù memestra.

Met barrek eo ivez an IRA war an elek-troneg ! Hervez ar gelaouenn "Hibernia" e vefe gant an arme guzh iwerzhonat un nebeut "mini-ordinatoroù". Ur merk japanat a zo gant ar binvioù-se, met graet int en Texas ha prenet e New-York. Gouest eo an IRA gant ar seurt benveg da dapout kement sin radio kaset gant an arme saoz etre 30 ha 530 MHz ha dre-se da heuliañ ha da anavezout jeu ar soudarded. Setu aze un torr-penn ouzhpenn evit Humphrey ATKINS haq an arme saoz.

AR STOURM WAR AN DACHENN

17-1-80

Tri soudard eus an UDR ha daou hini all gloazet e Castlewellan, C<sup>e</sup> Down, gant ur vombezenn lakaet da darzhañ gant an IRA.

26-1-80

Ur soudard saoz lazhet e Belfast gant an IRA.

29-1-80

Ur soudard eus an UDR lazhet a dennoù fuzuilh e Belfast.

3-2-80

Ur c'haporal eus an UDR, A. Abercrombie, lazhet e kontelezh Fermanagh.

11-2-80

Daou soudard eus ar RUC (Royal Ulster Constabulary) lazhet e Roshea, kontelezh Fermanagh, tost ouzh harzoù ar Republik. Da heul an dagadenn-se, azet gant an IRA, en deus Ian PAISLEY gouennet ma vefe adlakaet da dalvezout ar c'hastizmarv gant Bro-Saoz : "Poent eo d'ar gevredigezh skarzhañ tud an IRA da vat."

15-3-80

Lazhet, Hugh MAGUIRE, ur paotrig nav bloaz da heul un emgann er straed gant soudarded saoz. Hervez ar republikaned e vefe bet flastret gant ur c'harr eus an arme. An arme a zisklerias e oa bet lazhet "gant un taol barrenn houarn skoet war e benn".

2-4-80

Carl Mc PARLAND, ezel eus an IRA, lazhet a dennoù fuzuilh e ti e c'hoar, e Belfast.

6-4-80

Ur vombezenn a darzh e bered Milltown, Belfast, ur pennadig arak ma errufe ur gerzhadeg republikan e koun dispac'h 1916. Den gloazet ebet. Tagadenn asantet gant an TARA.

12-4-80

Lazhet, ur c'haporal eus ar RUC, e Belfast, gant an IRA.

GWENDAL DENEZ

skol ober

PLUFUR  
22 310 PLISTIN

skrid

KELLAOUENN LENNEGEL AR RE YAOUANK

KOUMANANT: 30 LUR  
evit 4 niverenn

Da : Per Denez, Ri, Ploare  
29 100 DOARNENEZ



KENDALC'H KELTIEK

Skourr Breizh ar c'hendalc'h keltiek en em vodo d'al lun 7 a viz Gouere 80 er Sal Savidan e Lanuon da 2eur 1/4.

Diaesterioù a sav evit lakaat ar c'hendalc'h-se da vezañ dalc'het e miz Gouere er gêr dibabet. Ezhomm en deus ar bodad-labour resev skoazell ar mutiañ posupl a genlabourerien. Ti-kêr Lanuon en deus c'hoant e vefe digor ar c'hendalc'h war vuhez kêr. Kalz a draoù a zo da sevel. Ezhomm hon eus evit ar bodadoù-labour eus brezhonegerien. Pe mod-all e vo graet al labour e galleg penn-da-benn. Fedet eo an holl da zont. PER DENEZ, rener skourr Breizh, a zeuio d'an emvod, a vo an hini pouez-usañ dalc'het betek-hen.

Danvez ar c'hendalc'h a vo gwelout pehini eo stad ar yezhoù keltiek, 7 vloaz goude an diskleriadur eus ar gwarioù sevenadurel savet e kendalc'h keltiek An Naoned.

Gortoz a reer e teufe kalz a Gelted tramor, eus Kembre dreist-holl. Er bloaz-mañ e vo ur c'hendalc'h e Dulenn (Iwerzhon) eus an 28 a viz Gouere d'an 2 a viz eost.

L. CHAPEL  
Roc'h ar Bleiz  
Sant Marzhin ar Maezioù  
29210 MONTROULEZ

# GWIRIOU MAB-DEN

"AR GOUARNAMANTOU A VOT EVIT GWIRIOU MAB-DEN ER BODADEGOU ETREVRoadel HAG A DAG ANEZHO ER GER" : Thomas Hammarberg danvez sekretour meur Amnesty International.

Abaoe dek vloaz bennak eo deut gwirioù mab-den da vezañ un elfenn a-bouez er politikerezh etrevroadel. Gant Emglev Helsinki kensinet gant 35 bro e 1975 eo deut anat al lañs a oa gant ar stourmerien liesseurt strewet er broioù kevalaour evit kas war-raok ar stourm evit frankiz an hiniennoù hag ar minorelezhioù. An Dael (\*) evit ar Surentez hag ar C'hennlabour en Europa eo a voule'has an hent. Ur skouer eo bet ar C'hendiviz (\*) European evit Gwirioù Mab-den er bed a-bezh, klask a reer he zreveziñ bremañ war bep kevandir (\*). Meur a stad gant meur a arsoñj avat a oe bodet en Helsinki ha ne voed ket pell a-raok merzout n'o doa ket ar memes doare da intent an emglev o doa sinet. Dael an disouezhhdenn e voe hini Belgrad e 1977, un digarez d'ar broioù krec'h da dabalat taer ouzh reoù ar c'hornog a-zivout an doare da gompren testenn an emglev. En tri mennad-mañ emañ an draen-fulh : en hini a zo kaoz ennañ da aesaat-hñ da vroudañ da lakaet er pleustr ar frankizioù hag ar gwirioù keodedel (\*), politikel, armerzhel, sokial, sevenadurel h.a. en hini a denn da wir ar broioù da zivizout o statud politikel diabarzh ha diavaez. Hag erfin en trede a gomz eus ar ret ma 'z eo chom hep emellout eus aferioù diabarzh ar broioù arall. En anv ar bennaenn (\*) a vir ouzh ar broioù a emellout eus aferioù diabarzh ar re arall e tamalle ar broioù krec'h ouzh reoù kornog Europa o burutella-dennoù e-keñver politikerezh gwirioù mab-den. Pep tu a chomas divrall avat met daoust d'an diouer a gengrediezh etre an daou du e c'heller lavarout e servijas testenn ar c'hendiviz da ziazeaz stourm da zisenterien U.R.S.S. hag e voe kentoc'h evito ur wellaenn. Ouzhpenn an disemglev diwar-benn gwirioù mab-den a bep tu (Moskou ivez ne vanke digarez ebet da rebech ouzh Carter e politikerezh e-keñver ar re zu) eo deut an traoù da washaat abaoe aloubidigezh

Afghanistan gant an arme ruz. Kaoz a vo eus kement-se e Madrid en eil c'hwec'hmi-ziad ar bloaz-mañ p'en em vodo ar gensi-nerien da sellout war o c'hiz war an di- soc'hoù degaset gant ar c'hendiviz.

Pell skañv eo avat folleñnoù an emglev e-skoaz dir ponner an tankoù rusian o tasseniñ e Kaboul. Rak setu ar gwall bra- sañ graet a-ratozh ouzh ar C'hendiviz, en ur aloubiñ Bro-Afghanistan e tiskouez ar Rusianed ar pouez a roont d'an emgle- vioù a sinont, daoust dezho degas forzh arguzennoù politikel hag elevezel da zis- plegañ o zaoz armet. Dizisrannus eo kudenn gwirioù mab-den diouzh hini ar c'hempouez er bed, diouzh hini an impalaerouriezhoù. En ur aloubiñ Afghanistan e tiskouez an U.R.S.S. he youl da vrasaat, da ledanaat he zachenn vilourel (\*) er bed ha da la- kaat dindan ar yev ar pobloù kar a vefe tuet da zisentiñ ouzh ar breur bras. Kom- pren a reer ervat nec'hamant Yougoslaviz war-lerc'h marv Tito. Re alies e reer gant gwirioù mab-den koulz ha gant an divizoù war an dizarmañ, an emglevioù S.A.L.T., evit klask touellañ an dud war balioù gwirion an div impalaerouriezh pennañ.

Bro-Amerika he doa graet gant Carter eus gwirioù mab-den unan eus kartoù pennañ he politikerezh diavaez. Erru e oa poent en em wennañ dirak ar bed goude drouzivezh ar Vietnam ha gwall-vrud Watergate. Gwall-gredus e seblante bezañ Carter pa lakae an U.R.S.S. war ziwall da waskañ o disenterien diabarzh. Dege- meret mat e oa ar politikerezh-se er C'hendalc'h Amerikan ha gant an darn vrasañ eus ar boblañs. Aesoc'h eo eozporzhiañ gwirioù mab-den eget doujañ outo en e vro ivez, n'eus ken sellout ouzh ar ouennelouriezh an Indianed war lerc'h o drouklazhadeg, ouzh an toullou-bac'h kazarnioù...

Ne chom ket kalz tra, n'eus forzh pe- naos, eus entan an derou. Pouezusoc'h eo bremañ d'ar Stadoù Unanet derc'hel penn ouzh an Unvaniezh Soviedel eget kavout abeg e politikerezh ar broioù tost outo a-zivout gwirioù an dud. Gwelloc'h eo d'ar Stadoù Unanet kreñvaat o bazennoù er bed a-bezh eget treiñ en o enep ar Stadoù kar ha pa wallfent gwirioù mab-den hem- dez Doue. Er Pakistan, ar jeneral Zia, lakaet da baria bloaz 'zo, a zo deut da vezañ penn bras "ar bed dieub". De- redek a ra d'e vete kannaded "ar hed dieub" a-vil-vern. Ret groñs eo d'ar Sta- doù Unanet diwall ar pleg-mor hag harpañ ar Pakistan a-enep an U.R.S.S. ma vez ezhomm. Trapenn da se e taver hiviziken war gwallioù gouarnamant a vazhata e enebourien pe a groug anezho war leurioù ar c'hèriou. En Arc'hantina eo heñvel un traoù, kannad ispisial ar prezidant Carter, ar jeneral Goodpaster, en dije roet da c'houzout da renerien Buenos Aires e c'hellfe frankañ ar gwask a boueze warno evit o boureviezh pemdeziek. Meur a skouer all a c'hellfed kavout eus pouez ar galloud er bed, eus ar c'heñver a ner- zhiou a lak gwirioù mab-den da ziskenn da eil renk ar rezevioù etrevroadel pennañ.

Kement-se a sav ar gudenn vrasañ war an dachenn etrevroadel hini an distenn pe ar brezel yen etre ar Stadoù Unanet hag an U.R.S.S. E berr komzoù hag-ñ e tiefer di-treiñ d'ar brezel yen en abeg evit darn eus gwallioù bras an U.R.S.S. en he politikerezh diabarzh ha diavaez e-keñver gwirioù mab-den ? Rak merzout a reer ez eo ar prantadoù rakbrezel pe reuz dia- barzh ar re washañ evit gwirioù mab-den. Emañ ar respont, n'eus forzh penaos, e dalc'h ar Rusianed koulz hag an Amerikaned.

Kaboul  
Kabadouilh!



Petra avat a c'hell ober an aozadurioù e-giz an Dael Europat pe Aozadur ar Riezou Unanet pa vez palforset harzoù Afghanistan ha lakaet dindan ar yev ur bobl a-bezh ? Pe c'hoazh pa vernier an dud a viliadoù war an tachennoù football a-raok o drouk- lazhañ, o boureviañ hag o c'harc'hariañ ; pa vez aloubet Tchekoslovakia, pa vez pellaet an disenterien bolitikel a-raok ar c'hoarioù Olimpek ? En aferioù a zisenterien ez eo bresk-meurbet an neudenn a liam an eil zisenterien ouzh ar re all hag ouzh an dud diavaez a stourm evito hag aes eo kompren e c'hell an disterañ pazenn a-dreuz lakaet an arvar ar gouni- doù a zo bet lakaet hirvloavezhioù a dreuzvarc'had da dizhout. Dic'halloud e chom peurvuiañ an aozadurioù etrevroadel da lakaat gwareziñ an dud. N'eus nemet skouer Bro-C'hres hag un tammig hini Bro-Saoz a ziskouez n'eo ket penn-da- benn aner klemmoù an aozadurioù etrevroa- del. Tamallet e oa bet Bro-C'hres ar Coronaled a voureviezh gant ar Bodad Europat evit Gwirioù mab-den ken he doa ranket houmañ dilezel he flas er bodad Europat pa ne oa ket evit en em wennañ. Nevez 'zo eo bet tamallet ivez a voureviezh Bro-Saoz en Iwerzhon an Hanternoz diwar intrudu gouarnamant Dulenn ha ret eo bet dezhi memestra bezañ kondaonet gant ar Bodad Europat ivez, pezh a zegas atav gwallvud ma n'eo ket evit rediañ ar vro-mañ-bro da cheñch he folitikerezh, ha ne blij ket peurvuiañ d'ar broioù a embann ez int demokratel bezañ lakaet da vac'homerien. An O.N.U. hag an U.N.E.S.C.O. ivez o deus klasket mont a-enep lazhadegoù 'zo en Ouganda, er C'hampout- chea h.a. met petra a c'hell an diskle- riadurioù etrevroadel a-enep an armeoù. Dalc'homp soñj ivez eus an S.D.N. a-raok an O.N.U., ur stal-brezeg, a "talking- shop" e-giz ma lavar ar saoznegerien, e lec'h ma tistage ar hec'helourien komzoù brav-tre met a voe dic'houest a-grenn da lakaat an disterañ harz d'an eil brezel bed.

Ouzhpenn ar brezel ouzh broioù ha po- bloù all ar reuz diabarzh a sav e broioù an dud ha da waskañ anezho. Keal an der- c'hel urzh eo a vez implijet evel pa vije an disterañ talvoudegezh gant an urzh enni hec'h-unan. Sellomp ouzh merzherin- ti Buskariz ha re all dindan dalc'h Fran- co (ha n'eo ket echu), ouzh al lezennoù evit emwarez ar stad a voe degemeret da vare brezel Aljeria hag a ra atav ganto gwashoc'h eget biskoazh ar Stad C'hall, sellit ouzh an digarezioù brav kavet er stourm ouzh ar spontelouriezh da fichen- naouañ an dud pe da wallañ gwirioù an dud



e-giz m'eo degouezhet nevez 'zo gant rastelladeg vras Bro-Gembre. Fellout a rafe d'an holl vroioù kaout ar gwir da damall ar pezh a c'haorvez e ti an amezeg hep ma teufe hemañ da lakaat e fri en o aferioù dezho o-unan. Ha kement-se a ziskouez pegen pouezus eo d'an dud voutin o-unan kemer perzh er bodadoù ensellout war zisoc'hoù pleustrek emglev Helsinki.

Ne blij ket nemeur, gwir eo, d'ar penoù stad gwelout aozadurioù o emellout dreist o fenn eus gwirioù mab-den, neo-ac'h daoust d'o sioù eo deut ar bodadoù, an aozadurioù-se da vezañ diziouerus d'an demokratelezh ha da wirioù an dud rak paneveto ne vije ket bet eus emglev Helsinki. Paneveto e vije tavet war galzik a weadurioù diabarzh... Rak pa seller adost n'eus bro ebet hag a vefe dinamm e-keñver gwirioù mab-den, derezioù a zo setu tout... Met petra zo kaoz e tiwan ken stank an dud o stourm evit gwirioù mab-den koulz er broioù krec'h hag er broioù kevalour abaoe un toullad bloavezhioù ?

Ar pezh a zo nevez abaoe brezel ar Vietnam, an distalinekadur, aloubidigezh Tchekoslovakia hag Afghanistan, diskar "bandenn ar pevar" eo diskar ar stered, ar c'healiadurezhioù meur a bare dalc'hmat er pellder war ur bed gwelloc'h. Merzet eo bet e oa paket al luskadoù-dieubiñ, a be tu e vefent, gant ar memes gwalloù a damallent d'o enebourien. Ne greder ket mui kement e 1980 er skouerioù glan a zispac'h, prantad an disouezhadennoù eo evit pezh a sell ar skouerioù meur kent. Pa glask mistri ar bed kevalour ha reoù ar bed sokialour strolañ dre gaer pe dre heg dindan o banniel ar broioù all e weler an dañjer a zo gant politikerezh an daou vloc'h. Pa weler n'eo ket cheñchet diaz an darempredoù armerzhel e broioù bet tizhet gant avel an dispac'h evel Portugal e klasker muioc'h-mui diskar ar mojennoù. Un distro d'ar stourmoù fetis, dezho palioù resis a vez santet en Europa ar c'hornog, ac'hano ar berzh a ra ar stroladoù e-giz Amnesty International a stourm evit gwirioù mab-den er bed a-bezh. En ur mare ma ya diwar dizh an darempredoù etre an dud e vez kalz aessoc'h ivez da geodediz liesvro stourm davet ar memes pal ha kaout darempredoù gant prizonidi a bellvro. Pouezus-tre eo o stourm brudañ pa ne vefe ken ha zoken ma chom dister a-wechoù o strivoù e chom ar stroladoù-se koustiañs vev an dud e dellezegzh mab-den.

Meurdez ar stourm-se eo e emroüsted hag e haelder-spered. Bezañ gouest d'en em gannañ evit gwirioù nep prizoniad, forzh pegen disheñvel e vefe e venozioù diouzh ho re, a zo dija lakaat an esperañs da ziwanañ evitañ. Trehontin ar strizh-kredennoù evit stourm war-eeun, doujus eus kredennoù pep hini, setu a ra d'an denelezh mont war-raok. Bezañ prest da stourm evit gwirioù gwallet an dud e forzh pe vro hep disoñjal da gentañ skubañ war hon treuzoù, sellout e toull an nor, setu ar bazenn gentañ evit krouiñ bodadoù tud prest da lakaat er pleustr an demokratelezh war-eeun. Ur stourm meur evit ar justis, ar peoc'h hag an denelouriezh eo hini gwirioù mab-den ha ne zlefe bout estren da hini ebet ac'hanomp...

#### YOUENN RAGENEZ

##### GERIOU DIAES

Dael evit ar Surentez hag ar C'henlabour en Europa : Conférence sur la Sécurité et la Coopération en Europe (C.S.C.E.)

Kendiviz European evit Gwirioù Mab-den : Convention Européenne des droits de l'homme.

kevandir -ioù, g. : continent

keodedel a.g. : civil

pennaenn -où, b. : principe

kengrediezh -ioù, b. : solidarité

milourel a.g. : militaire

distenn g. : détente

Aozadur ar Riezou Unanet : Organisation des Nations Unies (O.N.U.)

Kealiadurezh -ioù, g. : idéologie

# HOR YEZH

koumanant : 50 lur

CCP Denis I499-5I Rennes

Per Denez , Ri , Ploare

29100 Douarnenez

16



© gw. huon  
c'hwevrer 80

## plogo : ur mor a dud evit ar stourm

Brasañ tolp enep-nukleel 'zo bet biskoazh ! Aes e vije kavout abeg en ur gouel e-giz-se o vodañ kemend-all a dud. An 3 000 den a rae war-dro ar gouel ne oant ket a re ha memes da vareoù 'zo e yae an darvoudoù e-bioù dezho. Darn a oa fier-droch da vezañ deut a-dreuz ar parkier hep paeañ, hep bezañ roet an disterañ gweneg (ne gouste nemet pemp lur kouls-koude), darn a zeus hep aotre gant o stal, fritez, levrioù marc'had-mat : praktikoù a oa ken ha ken, kuita. Silerien-reuz a oa deut ivez evel just. Tud ar "Joint Français" deut da zisplegañ o c'hudennoù n'int ket bet degemeret mat-tre kennebeut. Dipitus eo un tamm marteze rak liammet eo an holl stourmoù e Breizh ha ma 'z eo stourm Flogoñv ur stourm enep-nukleel-rik, an enebour a zo memes hini, betegout. Ma, ret 'oa d'erc'hel d'ar menoz nukleel ken-kaz ez afe re bell an traoù !

30 000 a dud e Flogoñv evit ar Pantekost ! Un tamm mat berrvel marmouzier ha furlukined an tele hag ar radio gall (la France inter, 'giz ma laront). Dre c'hañs e oa radio Flogoñv, Flogoff kentoc'h, o silañ keleier a-feson war Breizh-Izel a-bezh. Daou zevvezh klok e voe Klevet mouezh Flogoñv e plas turubellhoù divlaz ar radio gall. Fromus e oa. Un tamall memestra hag unan a-bouez a gav din : n'eus bet klevet nemet ur vevl mouezh ur c'haper o kaozeal "yezh heson e dadol kozh" ha kement-se dre m'am boa pellsafaret evit klenn. Laret ez eus bet din ne brumetet netra met klask a refent kavout ur brezhoneger. N'ouzon ket penaos an disoñjal int bet gouest da gavout ur brezhoneger distagellet e-touez 100 000 a dud, liesliv, lieskare ! Ur burzhad deiz ar Pantekost ! Teri munutenn brezhoneg am eus bet, ne-

17

beutoc'h eget er radio stad ! A-walc'h a bismigerezh !

D'ar sadoe e oa c'hoazh moaien bale, ober ur frapad kaoz gant Ckitaniz an Herrault deuet da zisplegañ o flanedenn, ar stourm pemdeziek kaset en-dro evit en em zizober diouzh ar c'h-cogema a glask toullañ menleuzioù uranium en o bro. Tud al Larzac, en em gavet niverus da sikour "sovjed" ar far west a oa eno gant silzig, fourmaj-laezh, boued ekolo ha divizoù puilh en-dro d'o stalioù. Profet e voe tregont dañvad okitan d'ar sul en endervezh. Amañ e veze displeget penaos kaout tredan gant nerzh an svel, savet ez eus bet ur vifisvel war an tevenn, aze ur forum gant medisined, breutaerien, ha skiantourien. Dibosupl a-grenn selaou an holl zivizoù met da zibab a oa. Un toullad brav a draoù a oa tu deskif war roll ar skiantourien da skouer. Gant ar "groupement des scientifiques pour l'information nucléaire" e voe displeget e oa arabat fiziout er skiantourien nukleel daoust d'o gouiziegezh. Peurvuiañ ne ouezont ket re vat da belec'h e kaso o c'havadennoù. Tro 'm eus bet da gaozeal gant tud Eskibien, e brezhoneg mar plij... Tud war an oad memestra ! Tud hag a veze e Plogoñv o stourm bemdez-c'houlou hag e-pad an noz. Kaozet e voe diwar-benn an daou zen toullbac'het evit bout gwallgaset un archer (garde mobile). Evito ne oa kudenn ebet, ranket o dije teurel an orystal en dour sall ha distreiñ didrabas d'ar gêr ! An dud 'zo kriz memes-

tra. Yann Choucq, difenner an daou zen tamallet a gemere perzh er forum diwar-benn an nukleel hag ar gevredigezh. Ma vez savet ur greizenn e vo ret diwall anezhi ha piv a raio war-dro nemet ar re a voe gwelet e Plogoñv nepell 'zo !

Ken stank e oa an dud d'ar sul ma oa diaes mont war-raok pe war-gil. Pili-pasat a ranked ober. Teknisianed an tele a oa eno da filmañ ar re yaouank, hirvevek, dammoazh o koroll e-giz termaji, paotred ha merc'hed a-vesk ! "Ah ! Elle est belle not' jeunesse !" a lare darn, dispourbellet o daoulagad ganto dirak o fost tele. Pennoù touz St Cyr a zo bravoc'h da velet.

Dre chañs ne cant ket deuet a-benn da filmañ an "junkies" o vont gant al lavn en o seier kousket. N'o deus ket klevet tudoù 'zo o youc'hal "Plogo facho !" pa veze laret dezho implij ar seier plastik da deurel ar boestoù bier, pe c'hoazh ur plac'h he min-livrizh o laret : "Il me fait chier le speaker avec son breton à la con !" Kement-se a veze klevet amañ hag ahont ; chuchumchu. Ekologisti deuet da selaou Higelin an divezhat, kilhet brav o vlejal n'ouzon dare pesurt sotonioù diwar-benn ar butun camel hag ar c'hronenbourg ! Ma, kanerien ha sonerien all a oa euruzamant.

Un dra vat ez eo bet keñveriañ an holl stourmoù enep-nukleel kaset en-dro dre bevar c'horn ar vro. Stourm Plogoñv hag hini Chooz en Arennes a zo memes hini. An holl re deuet da Plogoñv diz ar Pantekost a oa a-du : nag e Plogoñv nag e lec'h all ebet !

TUDU



sk:gw.huon  
c'hwevrer 80

## hag hor yezh?

Ne c'heller ket kaozeal diwar-benn ar brezhoneg hiziv hep sellout ouzh e zarempred gant ar yezh sujer, ar galleg. Div yezh a zo tal ouzh tal, mesk-ha-mesk zoken, e Breizh-Izel hag ar stad a zivyezhegezh-se eo e fell deomp komz diwar he fouez. Divyezhegezh a zo, ya, met petra eo an divyezhegezh ? Meur a dra a zleer dirannañ, da gentañ penn e lavarar diwar-benn broioù 'zo ez int divyezhek pa vez komzet div yezh enno ha pa vefe war doledoù diforc'h. Pa vez div gumuniezh oc'h ober gant pep a yezh er memes bro hag int o vevañ war dachennoù bevennet-mat ne c'heller ket komz eus divyezhegezh nemet e par ar vro a-bezh, div unyezhegezh a zo aze. Divyezhegezh a zo pa vez komzet div yezh war an hevelep tachenn, pa vez div yezh o vevañ war ar memes tolead. Daou zoare a ranker c'hoazh dispartiañ amañ, an divyezhegezh a zo anezhi pa vezer o tremen buan eus ur yezh d'unan all ha pa vez an div yezh o kevezif war-eeun er gevredigezh. An eil doare divyezhegezh hag a vefe, m'ho peus c'hoant, an daoudeodegezh, a zo anezhañ pa vez komzet div yezh gant ar memes tud, hogen dezho tachennoù douar ha tachennoù buhez disheñvel. Bez ez eus eta un unyezhekadur diwar-dizh evel ma c'hoarveze gant an enbroerien er Stadul-Unanet a cheñche yezh e korf tri rummad-tud pe zoken daou evit ober gant ar saozneg a zigore an hent davet ar postoù labour mat er gevredigezh. An divyezhegezh amañ n'eo nemet an tremen herrek eus an eil yezh d'eben evit abegoù armerzhel, politikel, kevredigezhel h.a. ... An daoudeodegezh neuze a zo un divyezhegezh wirion d.l.e. unan badus, pezh ne vir ket tamm ebet ouzh an emgann etre an div yezh da gendec'hel.

### LEC'H AR BREZHONEG :

Penaos amañ kont gant ar brezhoneg eta ? Tuet e vefe da velout gantañ un tuadur d'an tremen-yezh, d'an divyezhegezh a-dizh gant divrezonekadur buhez an dud a vor hag ar gouerien. War-un-dro e veler o tiocren ur vuhez kevredigezhel neuze e brezhoneg o efedif tamm-

pe-damm war an hini henvoazel, ar vuhez nevez-se divanet diwar familhoù brezhonegerien giz nevez prest d'ober dalc'hmat gant o yezh war-ar-maez pe e kêr a verk ur c'henn bras er stourm evit ar yezh. Evit gounit an daoudeodegezh ledan a c'hellfe divougañ hor yezh e rankomp krefivaat an daou greñvlec'h a zo ganti ha gant pep yezh e seurt degouezh, he c'hreñvlec'h douarel er vro hag he c'hreñvlec'h kevredigezhel.

Da gentañ ar c'hreñvlec'h er vro, da lavarout eo an dachenn ma vez krefiv enni ar brezhoneg. Breizh-Izel eo hag enni bed ar maezioù dreist-holl, al labour-douar hag ivez ar pesketaerezh. Setu tachennoù ma oa chomet bev-buhezek hor yezh enno, pa oa c'hoazh eus ur gumuniezh frammet-mat a dud oc'h ober gant ar brezhoneg. Petra a c'hoarvez bremañ avat, n'eus ket mui ar memes darempredoù hag a-raok, trec'h eo ar galleg gant pouez an arnevesaat, ar mont-war-raok, teknik, tele h.a. ...

Bruzet eo pe war vruzetad e ya ar gevredigezh ha diwar-dizh c'hoazh. N'eus ken gwelout ar cheñchamantoù yezh a zo bet e nospet bourc'h vihan a Vreizh-Izel e-pad an hanter-kant vloaz tremenet. Tremenet eus ur stad ma rae nav diwar zek eus an dud gant ar brezhoneg en o darempredoù boutin d'ur stad m'eo deut ar galleg yezh voutin an darempredoù etre an dud. Mezhekadur ha gallekadur ar speredoù kaset war-raok gant ar republik hag an iliz o deus distrujet ar c'hig kevredigezhel a veve ennañ ar brezhoneg. Skolistaet fall eo bet ar rummaoù tremenet e pep keñver, divrezonekaet int bet ha gallekaet fall. Chom a rae memestra ar brezhoneg yezh ar vuhez war ar maez, yezh an endro kevredigezhel, an hini a veze ad-kemeret war-lerc'h ar skol. Levezon an endro, bed al labour-douar a oa krefiv-avalc'h da vrezhonekaat an dud a chome war ar maez tapet ganto pe get o santifikad. Krefiv-avalc'h e oa ar gevredigezh vrezhoneger evit mirout d'ar brezhoneg e benn roll er vuhez daoust da labour drastus ar skol c'hall. Echu eo kement-se avat ha peuzvarv eo hor yezh, zoken war-ar-maez pa seller ouzh an niver a vugale a vez preget outo en hor yezh hag a vefe gouest d'ober ganti. Ha kement-se a c'hoarvez en ur mare ma tro mui-oc'h-mui a dud a-du gant ar brezhoneg ha ma vez divyezhekaet an dud tamm-ha-tamm bennozh d'ar menozioù nevez ha d'ar plas he deus tapet ar yezh er radio hag er skinwel, forzh pegen dister e vefe.

## hag hor yezh?

Ul labour divent a zo d'ober aze evit gorrekaat kiladenn ar brezhoneg war- ar-maez ha liammañ ar yezh kozh ouzh ar rummadoù nevez a raio gant ar brezhoneg. Ret eo liammañ daou benn ar chadenn a-raok ma vefe re ziwezhat, ken e-keñver darempredoù evit adluskañ politikerezh ar yezh, ken e-keñver perzhioù ar yezh a ranker deskiñ gant ar vrezhonegerien a-vihanik. Un dra all a ranker lavarout kent klozañ gant plas hor yezh war douar hon bro eo e ra tud gant ar brezhoneg er-maez eus e emdro boas, er c'hêrioù bras e Breizh-Izel pe er-maez anezhi, kement-se a ziskouez ur youl nevez hag ur bazenn a vuhez nevez evit hor yezh a zo deut da vezañ ivez hini ur gumuniezh a familioù o vevañ e kêr. Dre vras memestra e ranker ren ar stourm evit ar yezh e Breizh-Izel e-mesk an dud a ra bemdez Doue gant ar brezhoneg, aze emañ ar stourm pennañ. Ur wech stabilaet endro ur gumuniezh vev oc'h ober gant ar brezhoneg e Breizh-Izel e vefe seul aesoc'h a se kaout kelc'hioù kreñv a vrezhonegerien e lec'h all. Rak, eno emañ ar reolenñ diazez, ne c'hell ket ur yezh bevañ pell hep harp ur gumuniezh a ra dalc'hmat ganti.

Petra eo plas hon yezh er gevredigezh avat ? Peseurt kreñvlec'h a zo dezhi en darempredoù etre an dud, peseurt tachenn miret dezhi e aotrefe anezhi da geneveañ gant ar yezh-sujer ? Kazi hini ebet. E Kembre da skouer e vir ar relijion dre he vuhez hollgembraek ur plas a-bouez da zerc'hel bev ar yezh ha da reiñ ur statud kevredigezhel kreñv dezhi. E Breizh an iliz, pe da nebeutañ ar renezh anezhi he deus gverzhnet mil bell'zo ar brezhoneg d'hor mamm santel ar Frañs. N'eo ket hepken mont da heul ar gallekadur he deus graet an iliz met bezañ pennkaoz ha luskerzh anezhañ. Zoken pa raed gant ar brezhoneg er c'hatekiz (ha pebezh brezhoneg alies !) e klasked gallekaat ar buanañ ar gwellañ, ouzh skouer bugale ar vourc'h pe reoù kêr, ar baourkaezh bugale diwar-lerc'h ne ouient nemet brezhoneg. Labour distruj eta a-berzh an iliz.

Labour distruj a-berzh ar skolioù ivez. Amañ daoust d'o c'hasoni a-gozh an eil evit eben e kerzhe dorn-ha-dorn skol ar gouarnamant ha skol ar veleien war hent ar stummañ Gallaoed. N'eo ket hepken plantañ dre heg ar galleg e penn an dud (ar vuoc'h h.a...) en ur vezhekaat da viken


rummadoù brezhonegerien o deus graet met ivez ober anezho tud dizek war an div yezh evit an darn vuiañ. Chom hep tremen dre ar brezhoneg evit deskiñ galleg a oa ar gwellañ doare da reiñ blaz ar brezhoneg d'ar galleg ha da gaout tud ne ouient ober a-zoare gant hini ebet eus an div yezh. Neuze e ranke ar Yretoned vihan mont e galleg hag ouzh Doue hag ouzh ar republik demokratel hag ingalerez a lakae anezho a live gant ar sitoiansed all.

Rak estreget er skol e ranked mont e galleg ouzh ar stad, en holl zarempredoù gant ar mererezh e oa ret gouzout galleg, el lezioù-barn (daoust ma oa jubennourien enno gwechall), er votadegoù, er burevioù, en tiez-kêr, er post ha me 'oar ... Ret eo cheñch yezh pa zeuer d'ar vourc'h da gomz ouzh aotrounez ar stad pe ouzh hec'h implijidi. Mui-oc'h-mui dre ma kemer pouez krap ar stad war vuhez an dud e teu da vezañ a-bouez ar mererezh hag an darempredoù ganti. N'eus ken sellout ouzh ar rusianekadur e-fedus a vez renet gant ar servijoù-stad en U.R.S.S. evit kompren. Ret e vefe eta lakaat ar stad da blegañ evit reiñ ur statud leun d'hor yezh hag un implij ken leun all. Un implij gant ar post, en arouezioù-boutin, war ar pannelloù-hent, en holl baperoù a-berzh stad, a-berzh deskadurezh, a-berzh ar c'hedskor h.a... Gounzet eo bet ar stourm-se e Kembre pa ne c'halled ket huifreal eno eus seurt disoc'hoù pemzek vloaz 'zo...

Un dra all a-bouez eo plas ar brezhoneg er radio hag er skinwel. Aze c'hoazh eo ur vezh ruz. N'hoc'h eus ken sellout ouzh an daolenn roet gant "lagadlemm" eus roll an abadennoù. Ne reer ket zoken an aluzon, tufañ war ar vrezhonegerien a reer. Ouzh-penn bezañ dister, ken e-keñver amzer, ken e-keñver danvez, eo dizemokratel-rik an doare ma vez renet bed ar post bihan hag ar post bras e brezhoneg. Arabat komz eus demokratelezh pa n'eus nemet un darn eus

Breizh he deus ar gwir da resev an abadennoù radio pemdeziek, pa vez kontet pishoc'h eget evit radio Brest munutennoù skignañ ar Wenedourion. Arabat komz eus demokratelezh pa vez atav meulet ar memes re, pa chom an abadennoù brezhonek klozet d'ur bern tud ha d'ur bern tachennoù buhez. Penaos komz eus demokratelezh pa ne vez morse an disterañ kendiviz gant tud a ali disheñvel war dazont hor yezh, lakaomp, gwir eo ez eus danvezioù-komz a ranker leuskel a-gostez. Pa vez goulnennet ouzhoc'h, selaouer, gant brezhonegerien a-vihanik da betra e servij "liv an amzer" pe perak e teu ken puilh ar gerioù galleg gant lod ez eo gwall-ziaes respont dre ma 'z eo bet dija renet ar varnadenn... Ne vo ket tu e Breizh da gomz eus demokratelezh tra ma chom an diviz gant renerien F.R. III, tra ma ne vo ket un aozadur demokratel o reiñ ar gomz d'ar sellerien ha d'ar selaouerien. Ur skouer e tle bezañ evidomp ar radio hag ar skinwel e Kembre e lec'h ma 'z eo aet war-gresk buan-tre niver an eurvezhioù e kembraeg kouls hag al live anezho (daoust ma chom re zister ar gounid ha ma Klask ar stourmerien kaout ur chadenn skinwel hollgembraek), ur skouer a stourm hag ur skouer a demokratelezh rak eno e vez doujet da venozioù an dud ha ne vez ket klasket diskouez dalc'hmat un tu hepken eus an traoù. Ret eo eta e Breizh stourm evit reiñ ur plas bras-oc'h-bras d'hor yezh er stiennañ-yoc'hek hag evit cheñch sistem ar servij boutin ha n'eo ket boutin evit ur blank.

Bannet er-maez eus an iliz, eus ar skolioù, eus ar vuhez-stad, eus ar radio hag an tele peseurt tachenn a chom eta d'ar brezhoneg ? Hini an darempredoù etre ar gouerien, ar beskestaerien ha c'hoazh diouzh e oad ha diouzh al lec'h ma vevont. Ret e vefe studiañ pizh dre ur goulnennadeg resis plas ar yezh en darempredoù pemdeziek etre an dud, gant an amezelen, ar familh, teknisianed al labour-douar, an droc'herien-viev, pastred-al-lizhiri, ouzh taol, gant ar vugale ha me 'oar me ...



Piv avat a gaso da-benn seurt enklask ? N'eo ket ar stad, pelloc'h bepred ! Muioc'h-mui pa vez darempredol zoken etre al labourerien-douar o tont eus kornadoul diforc'h e reer gant ar galleg, n'eo ket kement-se e vefe diaesoc'h bremañ en em gompren eus an eil penn d'ar vro vrezhonek d'egile eget gwechall pa veze foarioù bras e Pont-e-Kroaz, e Landivizio ha me oar ... Tamm ebet zoken met ken kreñv eo pouez ar galleg ma kaver gwel cheñch yezh trapenn d'an disterañ diforc'h a c'herioù, a bouez-mouezh h.a... Ret eo lavarout ivez ne lonk ket mui ar yezh war-ar-maez degasadennoù nevez an arakaat evel diagent. Pa oa c'hoazh eus ar brezhoneg ur yezh en he sav en ur gevredigezh frammet-start e veze roet anvioù brezhonek d'an traoù nevez, e skoaz bremañ e kemerer digudenn ar re c'hallek. Ur giladenn ouzhpenn evit hor yezh ha n'eo ket dic'houest da zegemer ar bed arnevez met a vez renket gant an traoù kozh en abeg da hast an dud da deurel kuit yezh ar blouked evit mont tre buanoc'h er bed modern renet gant ar galleg. Anat eo diskar ar yezh pa gomzer ouzh ar re gozh ne brizioñ ket nemeur alies ar yezh distreset a zeu gant o bugale. Ur yezh war goazhañ diwar dizh war-ar-maez hag a vefe bevvennet d'un nebeut stourmerien nemetken, da baotred ar brezhoneg, setu ar riskl. Ar re-mañ a rank peuzeskif ar yezh ha diskouez dre o stourm e c'heller ober ganti e pep degouezh. Aze ivez e tleer liammañ daou benn ar chadenn, ar brezhoneg komzet gant ar bobl ouzh hini an emsav ha digeriñ frank an nor d'ar vrezhonegerien a-vihanik. Penaos avat e vo tizhet tapout ur statud ofisiel d'hor yezh er gevredigezh, hag a zlefe, arabat en em douellañ, bezañ a-us da hini ar galleg e Breizh evit adreiñ ur c'hempouez hag an disterañ chañs d'hor yezh.

Meur a nerzh a zo a-bouez amañ n'eo ket e Breizh hepken rak merzet eo bet kement-se er broioù arall o ren stourmadol heñvel. Hini ar c'hedveno, doare soñjal ar boblañs a-bezh hag a emdro diouzh levezon an emsav enni ha diouzh an degemer a reer d'eo venozioù. Ar c'hedveno eta, an emsav e-unan d.l.e. an aozadurioù politikel, ar strollad broadel ma 'z eus unan, a c'hell lakat ar pennadurezhioù da blegañ, ha da zivrezhañ an emsav sevenadurel hag an elfenn bouezusañ anezhañ : kevredigezh ar yezh ( da skouer ar c'hevre gouezelek, Cymdeithas yr Iaith Gymraeg, Skol an Emsav). Strollad ar yezh a rank bout broadus hag evedus. Dre e stourm dizehan, dibleg ha mennet

da vont betek penn koustet a gousto e tle gounit an trec'hioù kentañ hag heñchañ ar stourm evit ar yezh. Da roued-skignañ er boblañs ez eo a-bouez bras harp ar strolladoù broadel evit gounid kensikour an dud ha da zivrezhañ e ranker lavarout e tegas muioc'h eget oberoù dizehan ar stourmerien e-keñver levezon, ansoudegezh ofisiel ar yezh gant ar stad. Setu eta an tudennoù renket el lezvarn ma vez barnet hor yezh enni : ar gouarnamant da varner, ar c'hedveno da juri, ar bobl hag an emsav er sal.

Etre daouarn ar Vretoned emañ dazont o yezh ha krog int da ziskouez ne fell ket dezho bout dibere'hennet deuzouti. Bez zo palioù a c'hell bout tizhet a-barzh pell, ober eus Diwan ur skol vras dre ar vro a-bezh a raio dre ar brezhoneg hepken en he c'helennadurezh, digeriñ dorioù ar skolioù all da gelennadurezh hor yezh, lakat an tiez-kêr d'ober gant ar brezhoneg war ar panelloù-hent h.a... Ar pep pouezusañ eo divezhekaat buan ar Vretoned dre lakat an dud e karg, an dud o deus graet promesaou brav evit hor yezh hag hor sevenadur da zerc'hel d'eo ger. Ret e vo ivez d'erc'hel startoc'h d'hor gwirioù e pep lec'h, arabat e vo plegañ atav da youl ar c'hallegerien pa vez en ur bodad ur muiañ-niver a vrezhonegerien. Ret e vo brezhonekaat hor gouelioù, hor festoù-noz evit ober anezho lec'hioù ma kaver reizh ober gant ar brezhoneg enno... An dispac'h kentañ eo hini ar speredoù, pa vo bet adroet gant oberoù-skouer e-giz hini Diwan o emfiziñs d'ar Vretoned, pa vo bet roet lamm d'ar spered gall e Breizh neuze e vo digor frank dorioù an dazont d'hor yezh...



**PENNAD-KAOZ** gant an aotrou LEON FLEURIOT, kelennar war ar yezhoù keltiek e skol-veur Roazhon, diwar-benn e levr nevez "les origines de la Bretagne" a zo o paouez dont er-maez.

**A.L. - Perak mont da glask roudoù kozh hon istor ?**

Ret eo klask an orin, an holl bobloù a glask o orin. Fouezus-tre eo an dra-se. War an douar bras n'eus nemedomp evel pobl keltiek, ar rann vrasañ anezhi da'n nebeutañ, n'omp ket Kelted c'hlan a-hend-all ; ret eo gwelout roudoù an istor war ar bobl. Darvoudoù mat ha darvoudoù fall hon eus, a bep seurt, met ur seurt burzhud eo gwelout e viromp kement a draoù eus an hemaer.

**A.L. - War betore dielloù hoc'h eus labourer ?**

An dielloù a oa anavezet dija pell'zo, met ret e oa advelout an darn vrasañ anezho peogwir e oant lakaet da zidavez gant istorourien, ne lavarfe skol Bariz marteze, e penn-kentañ ar c'hantved... Tud gant anvioù bras evel Bédier ha Farral, da skouer, a oa re uhel marteze evit plegañ da zeskif an traoù keltiek, o deus lavaret re alies e oa didalvez ar pezh ne ouient ket. Unan anezho 'm eus soñj a lavare da skouer e oa ur romant eus Bro-Gembre eus an 13-vet kantved peogwir e oa an dornskrid eus ar c'hantved-se. Ha neuze Vendryes, ar c'heltiegour brudet, ne oa ket ur Breizhad, a responte : "Me lavaro ez eo facit ur skri-vagner eus an 13-vet kantved peogwir n'eo bet miret e destennoù nemet e dornskridoù eus ar mare-se. Ret e oa teuler ur sell a-dost war an dielloù-se hag evit se an eus heuliet alies boaz an istorourien ket labour e Bro-Saoz. Aze ne c'hoarzhont ket dirak an traoù keltiek, studiañ a reont a-zevri, hag ur bern traoù a zo bet dizo-loet gante. Ret eo pouezañ war levr Chadwick, "Early Brittany" a-raok, a zo bet aven al levr-mañ. Dre ma oa deut kozh dija eo ma-net diechu al levr-se. D'am soñj e oa ur bern traoù da lavarout ouzhpenn se.

Un dra a seblant stal'laet-mat dija zo e oa divroadur ar Vretoned un dra gozh hag un dra ledan. Div vagnenn a zo bet da'n alies gant plijadur, tud o deus tec'het hag en Europa a-bezh a-raok amzer ar Romaned dija e oa darempredol etre ar Veneti hag ar Vretoned, evel ma ouzo'h. Kaezar en deus meneget an dra-se. Sikouret o deus

## DIVIZ GANT leon fleuriot

ar Veneti a-enep ar Romaned, ar re-se a oa boazet da dreuzif ar mor evel an Armorikaned ivez. Ar pezh n'eo ket bet skrivet war al levr, marteze n'am eus ket pouezet a-valc'h, eo e kavit a-vis-koazh tud eus hanternoz Mor Breizh annezet amañ hag ar c'hontrol a oa gwir ivez. Setu, d'am soñj, ar pezh en deus prouet Joseph Loth, kavet en deus er 16-vet kantved un den diwar c'hevoc'h deut eus Breizh o vevañ e Bro-Gerne, e penn-kentañ ar 16-vet kantved. Skrivet eo goude o anvioù : Britto, war rollioù an dud varv. Ivo Britto, Grallon Britto h.a. Souezhus e oa ar c'hementad hag ar c'hontrol a oa gwir moarvat. Me 'soñj ne zeu ket ur bern tud anvet Kerne amañ eus Kerne en douar bras met eus Kerne-Veur alies.

**A.L. - Perak e oant bountet da cheñch bro ?**

Dre abegoù a genverzh alies, a eskemm. Evel m'eo bet ar boaz gant ar Vretoned e-pad kantvedoù. Ni 'zo bet martolod a-viskoazh. Da skouer dija e amzer ar Romaned e oa ur c'henverzh tric'hognek etre Bourdel, Armorika, Breizh-Veur hag aber ar Roen. Padet en deus e-pad ar Grennamzer, gwin Bourdel kaset da vezañ gwerzhet e broioù an hanternoz ha madou an hanternoz kaset betek ar Mor Kreizdouarel zoken.

**A.L. - Hag e-keñver yezh, daoust hag e tisplegit eus pelec'h e teu ar brezhoneg ?**

Ya, gouestlet eo tri c'hard al levr d'an istor. Ar c'hudennoù yezh avat n'int ket ken luziet-se ; me 'soñj ez eo bet ur gudenn faos a-viskoazh. A-dra-sur ne oa ket marv ar galianeg pa 'z eo deut ar Vretoned peogwir e oant stav dre amañ. Da skouer Brieg, ar stumm kozh a oa Brithiac eus Britannum, pezh a ziskouez e oant aze e amzer ar Romaned dija. Brieg n'en deus netra da velout gant Sant-Brieg, ret eo studiañ istor an anvioù-lec'h. Brieg a oa Brithiac ha Sant-Brieg a oa Sant-Brioc gwechall, disheñvel-tre eo. Ne oa ket marv ar galianeg, ouzhpenn se ar memes familh a yezhoù e oa, an diforc'h

etre ar brezhoneg hag ar galianeg a zo un diforc'h a amzer. Bez 'peus yezhoù 'giz kozh gant gerioù troet, gant al lostger a gemm, "cas" e galleg evel just. Bez 'peus ivez yezhoù 'giz nevez evel ar saozneg... an alamaneg, nann, pas a-grenn, pe ar galleg. Miret en deus an alamaneg darn eus ar gerioù troet pe blegat, an dro-c'henel da gentañ, "général" en alamaneg ha me oar. Met e galleg eo bet kollet penn-da-benn ar sistem-se, ar fram-adurezh. Ar brezhoneg en deus kollet diwez ar gerioù er 6-vet kantved evel ar c'hembraeg ha neuze eo bet distummet, kemmet penn-da-benn ar yezhoù. Araogennoù o deus kemeret plas diwez ar ger a vanke. Deut eo ar c'hemadurioù diwar levezon ar ger a oa a-raok, pa oa ur vogalenn a-raok eo bet ur c'hemadur dre vloataat, pa oa ur gensonenn a-raok eo bet ur c'hemadur dre galetaat pe ur c'hwezhadur bennak. N'eo ket gwall-gevrinus ar gadunn. Met posupl eo lavarout e kendalc'h ar brezhoneg koulz ar galianeg hag ar predeneg peogwir e oant ar memes yezh. Da skouer evit lavarout ur pont e oa briva e predeneg ha briva e galianeg. Ha n'eo ket tostoc'h ar gwenedeg ouzh ar galianeg, a dra sur, muioc'h a latin a oa komzet e Bro-Gwened peogwir e oa ur gêr veur aze, Gwened. Er 6-vet kantved e oa bev-mat c'hoazh ar galianeg, gouez da Gregoire de Tours, Fortunat da skouer a gomz eus ar galianeg evel ur yezh vev. Marteze e oa marv e-kichen Naoned, Roazhon, zoken Gwened, peogwir e oa aze kêrioù bras met er "Massif Central", en Alpoù, hag all e chome bev-mat ar galianeg. Ha marteze zoken en uheldirioù 'kosteiz Mayenne, Normandi e lec'h n'eus kêr ebet, bro ar sorserien hag all, rak ur bern gerioù keltiek a gaver er rannyezhoù, kalz muioc'h eget e galleg Pariz. Da skouer e lavar an dud "bronnas" evit bronnoù ha kalz a skouerioù all a zo.

A.L. - Penaos eo bet an darempredoù etre an dud a zeus eus Breizh-Veur hag ar re a oa e Breizh e-keñver yezh ?

An dud-se en em gompren mat-avaloc'h, nebeutoc'h a ziforc'h a oa etrezo eget bremañ etre Leon ha Gwened. Lavaret e veze "ratina" evit ar plant a zo raden bremañ, ar ger a oa anavezet a bep tu eus ar mor.

Ar ger Cadwallon c'hoazh, ma klaskit ar roudoù anezhañ ; Cadwallon en henvrezhoneg en deus roet Kadalen, kadalan, Kavalan hag all, a oa Catu uellaunos, a bep tu eus ar mor. Ar memes pobl e oa.

A.L. - Perak eo deuet an diforc'h etre ar rannyezhoù, ha perak ez eo tostoc'h ar gwenedeg ouzh ar c'hembraeg ?

Ya, n'eo ket tostoc'h ar gwenedeg ouzh ar galianeg peogwir e kavit ennañ ur bern emroadurioù heñvel ouzh ar c'hembraeg. Sellomp da skouer ouzh ar c'hembraeg. Sellomp da skouer ouzh ar stroiladoù tn pe kn, pe ouzh o heuliadoù ten pe ken a zo bet dalc'het e gwenedeg. Ar ger traonienn : henvrezhoneg tnou, tonou ; nevezvrezhoneg KLT traou, traoù ; hembraeg tnou, tonou, kembraeg a vremañ tyno ; Gwenedeg a vremañ téno. Pe c'hoazh krec'h, henvrezhoneg cnoch, krennvrezhoneg knech, nevezvrezhoneg KLT krec'h, gwenedeg quene. An diforc'h etre ar gwenedeg hag ar rannyezhoù all a zo un dra koshoc'h eget ar rannyezhoù all. Hervez labourioù Jackson e oa dija roudoù eus an diforc'h en 12-vet kantved. Bez'zo tu da gredif e oa ar pouez-mouezh e lec'h en henvrezhoneg war ar silabenn zivezhañ. Kement-se ur wech kollet ur silabenn goshoc'h c'hoazh : Marcacoc, aet da v/marchog en henvrezhoneg, ur wech kollet os, goude-se mareg e gwenedeg ha chomet eo ar pouez-mouezh e lec'h ma oa. Lod a gred eo dre levezon ar galleg hag a zo ur yezh hep taol-mouezh. Hogen e kembraeg hag e KLT e oa ken kreñv al lusk da bouezhañ war an eil silabenn divezhañ, zoken ma ne oa ket emskiantek al lusk-se, ma 'z int bet tuet goude un nebeut kantvedoù da bouezhañ adarre war an eil silabenn divezhañ. Abalamour d'an diforc'h-se etrezañ hag ar c'h/KLT en deus miret ar gwenedeg e-kichen an traoù nevez amprestet digant ar galleg ur bern traoù kozh ivez. Gant al liester en eu pe c'hoazh en eadurezh, implij an anv-verb, framadur ar raganvioù, raganvioù renet a-raok ar verb e tiskouez ar gwenedeg bout tost ouzh ar brezhoneg krenn. Alies an eus gwelet o doa Gwenediz nebeutoc'h a boan eget re all o kompren ar brezhoneg krenn. Evit ar rannyezhoù all avat n'emañ ket ar respont en amzerioù re gozh. Ganet int

bet tostoc'h ouzhimp, goude an 12-vet kantved ha n'eo deuet da vezañ don an diforc'h etrezo nemet war-dro ar 15-vet pe ar 16-vet hepken. N'eo ket un afer a Vreizh a-viskoazh. Afer ar rannyezhoù n'eo ket da vezañ lakaet, an dra-se a lavaran a-enep menozioù 'zo, en hembraeg, e amzer ar rouaned, an dra-se zo un dra vodern a-walc'h. Betek ar 16-vet kantved e oa e Breizh ur yezh lennegel, an hevelep hini e pep lec'h, a oa desket er skolioù. Sellit ouzh "an Donoet", ur yezhadur latin e brezhoneg krenn, en deus studiet Gwenael Le Duc e "Etudes Celtiques". Er mare-se ne oa ket ar brezhoneg kement-se un danvez studi met ur benveg studi. Ha servij a rae ar chapelioù strewet war ar maezioù da skolioù. Bez zo reoù a zo anvet Ti-gouzout, Lanskolva. Tud desket-tre e oa ar Vretoned, hag a-us d'ar rannyezhoù ne oant ket gwall-zisheñvel d'ar mare-se e oa ur yezh gumun. An anvioù da skouer, setu amañ ur broenn etre mil en hevelep doare en holl vroioù : Gourcuff, an Ozac'h-meur e lec'h bremañ e vez distaget "osac'h" h.a. gant an dud. Bez e oa ur stumm skrivet, ur stumm mat. Goude an unvaniezh gant Bro-C'hall da dreist-holl diwar levezon Colbert, Mazarin ha me oar, o deus dilezet an dud lennek, ne lavaran ket an dud binvidik, ne oant ket an hevelep re atav, ne oa ket atav pinvidik ar gloer, ar brezhoneg e-kreiz ar 17-vet kantved, dilezet an holl zoareoù da sevel gwerzennoù da skouer. P'o deus dilezet ar yezh glasel ha lennegel, ar rannyezhoù dieubet zo kroget da emdreiñ diouzh o zu. Bez hon eus ar ger hiziv, skouerien eo red e istor : e galianeg e oa sindiu, indiu, inniu en iwerzhoneg, heddiw e kembraeg, a dra sur e oa heddiw e brezhoneg krenn. Ur wech dilezet ar yezh gumun en deus distaget pep hini ar ger en e feson : 3 zo aet da r, da z, da netra, da d (hidi, hudu), hirio, hirie, hio, hïw h.a... A-viskoazh o deus karet an dud lennek distagañ mat ar gerioù. O freder eo distagañ mat atav. Prouennoù all hon eus e oa ur yezh gumun etre an dud. Al levrioù a veze gwerzhet a-viliadoù en hevelep yezh. Posupl eo proufiñ ez eo nevez alies-tre ar stummoù rannyezhiel ; kemerit kartenn patatez 'barab an atlas linguistique, n'eo ket kozh ar ger-se peogwir eo deut ar patatez daou gantved'zo ; kavout a rit : patatez, pato, pata's, avaloc'h-douar, 'val-dou'r, al-douar h.a... E korri daou gantved ez eus dija bet krouet kemend-all a stummoù...


A.L. - Penaos e vez sellet ouzh hon istor gant an dud a vicher ?

An istorourien a-vremañ a glask en amzer dremenet o sistemoù da gentañ tout. Da skouer e klask tud 'zo klasoù ; ar brezel etre klasoù. Met ne glot ket an amzer dremenet gant ar renkadur a vez graet er spredoù a-vremañ. Un dra a gontez kalz er pobloù keltiek dreist-holl a oa ar familh vras, ar genedl gwechall, ya, an dra-se a gontez kalz muioc'h eget klas an dud. Setu an dra-se a oa un nerzh marteze peogwir ne oa ket kalz a ziforc'h atav etre ar re baour hag ar re binvidik peogwir e oa (s.o. 'leir Planiol, histoire des institutions bretonnes) atantoù gounezet etre breudeur, perc'henn e oa ar familh, hi eo a biaeue an douarol alies ha n'eo ket an den e-unan. Pouez ar familh a gavit ivez el lezennoù. Pa oa kiriek un den eus ur muntr, lakaomp, eo ar familh a-bezh a ranke paeañ ha n'eo ket an den e-unan-penn. Enframmet e oa en aergelc'h disheñvel diouzh hon hini, diaes eo lakaat hon mennoù en amzer dremenet.

Evit klozañ e c'heller lavarout e tiskouez ar studiadennoù ez eo Breizh ur vro gozh, pezh a oa goulakaet a-wechoù. Ni hon eus roudoù ur bobl vras, ur BOBL VEUR.



# laboused



AR GOUELAN GRIS - LARUS ARGENTATUS -

SR. HEDU

## perak ampoezoniñ ar gouelan gris ?

Hag-efñ e ranker leuskel niver ar gouelani gris da greskiñ pe get ? N'eus ket nemeur a dud prest da zifenn al laboused-mor-se, forbanned ha mistri galloudus ar mor don. Bez ez eo ar gouelan gris ul labous krefiv, kalet ouzh ar boan ha kalz nerzhusoc'h eget al laboused all. Krog eo an dud o deus graet fortun war an dastum istr da glemm ha da stourm ouzh ar gouelani milliget a dennoù fuzuilh. Tonelladoù istr a vez lonket ganto bep bloaz, war a lavarer. Preizherien divergont ! N'eo ar gouelan gris nag aonik nag habask ; e-giz mab-den ez eo deuet da voazañ ouzh ar c'hêrioù bras hag ouzh an tourioù betoñs ha dir... Gwelet ez eus bet nepell 'zo gouelani o tozviñ e beg tourioù uhelañ London. Ar gevredigezh nevez, techet ma 'z eo da foeltrañ magadurezh hag a bep seurt traoù ha ne blijont ket mui dezhi he deus saveteet ar gouelani. Pa n'eus ket istr, e kav ar gouelani bod war tachennoù divent, warno turumelloù lastez ha moc'haj, savet en diavaez ar c'hêrioù bras. Ur gudenn gevredigezhel ha na glasker ket diskoulmañ : aesoc'h eo gouzañv flaez ar vreinadurezh eget en em zizober diouti.

Ur gudenn all a sav hag hi grevusoc'h moarvat. Kement eo kresket niver ar gouelani (pa soñjer ne oa gouelan gris ebet o tozviñ e Breizh e penn-kentañ ar c'hantved) ma ne c'hell ket al laboused all sevel o neizh war an enezennoù. Ar skrafitged a zo tonket da vont da get buantre ma ne reer un ardoù bennak evit mirout ouzh ar gouelini da aloubiñ ar vro. Divizet ez eus bet gant an naturourien lazhañ un toullad a ouelani gris ar bloaz-mañ e Breizh. Pell 'zo dija ez eo krog al "lazhadeg" er broioù all, memes e Bro-Saoz, ken labousgar koulskoude !

Ampoezonet e vezont war o neizh e-pad an hafv. Kement-se n'eo ket evit plijout da dout an dud. Darn a lavar ez eo mont a-enep da lezenn an natur. Daoust hag ez eus c'hoazh anezhi ? Cheñchet mat eo an traoù an deiz a hiziv. Ya, ur marv kriz ha ne blij ket kalz d'an naturourien kas da vad al labour vil-se. An diskoulm nemetañ eo evit en em zizober diouz an dregantad gouelani dreistniverus war hon aodoù. Re mui skraffig ebet o tozviñ war Meaban. Marteze n'eus ket nemet ar gouelan gris a zo kablus en afer, an douristed o tont gant o yachtoù betek Meaban hag o leuskel chas ha bugale da redek war an enezenn, daoust d'an difenn groñs a zo ken kablus all, ne vint ket ampoezonet avat, tud int ha tud pinvidik war ar marc'had ! **tudu**

## brave new world

1-

Ul labouradeg kaer, eus ar re vodernañ, a oa bet savet e-kichen Leningrad evit renkañ traktourien labourerien-douar gwalarn ar vro : barrek da renkañ 14 000 traktour ar bloaz. E kirlegezh ar Burev-Tisaverezh, niverenn 49, renet gant an Ao. A.V. Prokhovich, e oa al labouradeg-se. Kroget oa bet al labour e 1974, echu al labour e miz Kerzu 1978 ha digoret al labouradeg ez-ofisiel e miz C'hwevrer 1979.

E-pad bloaz e oa bet kolloù arc'hant gant al labouradeg, ar pezh n'eo ket souezhus, pa groger gant un dra nevez. Daoust da se, avat, e veze diaes d'al labourerien-douar lakaat renkañ o zrak-tourien, hag izel e chome ar stadegoù-labour. Kement-se ivez ne oa ket marteze re souezhus : al labouradeg ne oa ket anezhi. 'Ta deiz bennak, e fin 1979, pa oa ar renkañ-traktourien o vont en-dro abaoe ouzhpenn bloaz, ez-ofisiel-tre, e oa aet un nebeut ensellerien da glask penn eus al labouradeg : war al lec'h ne oa nemet un nebeut lochennoù diechu, foziou-fonterezh a-boan karget gant mein ha simant, ur mell kael, hag ur gward kozh o tiwall ar gael-se : laouen e voe ar gward o welout an ensellerien, daoust ma voe souezhet gant o goulennnoù : abaoe mizioù ha mizioù n'en doa gwelet den ebet.

Ha koulskoude, pa oa al laboused o neizhiañ e toulloù ar mogerioù, e oa bet sinet gant ar penn-savour ur baperenn o tisplegañ "e oa echu ar savadur diouz ar raktresoù, hag e oa prest evit an implij". Sinet e oa bet kement-se neuze 'ta gant ar penn-tisavour. Sinet oa bet ivez ur baperenn gant medisin al labouradeg. Paotred-an-tan o doa sinet na oa riskl-tangwall ebet. Hag evezhierien-an-endo o doa sinet na oa ket an natur e riskl da vezañ kontammet gant reputajoù al labouradeg. Ha tout an dra-se a oa gwir a-walc'h !

E Moskva, er burevioù bras, e oa laouen an dud peogwir e oa ar paperoù en urzh.

Un nebeut kargidi, da heul an afer-se, a zo bet torret eus o c'harg, re all o deus bet notennoù fall ! Met betek-hen n'eus labouradeg ebet c'hoazh : penaos o deus graet al labourerien-douar, e-keit-se, evit derc'hel o zrak-tourien da vont en-dro ?

2 -

Gant ar skiant hag an araokaat ez eus bet gant ur ouenn nevez a laeron : al laeron dre ordinator. Poliserien Interpol, bodet e Paris warlene, a glemme pege diaes e oa tapout al laeron-se. Ouzhpenn-se, zoken ma vezont tapet, eo diaes kavout un abeg d'o c'has dirak al lezvarn : e-keñver lezenn n'hellont bezañ pourchuet nemet evit bezañ "gwall-implijet amzer-labour un ordinator", pe "bezañ laeret tredan digant ar post", pe "bezañ torret reolennoù ar servijoù-post".

Aes eo d'an dud-se, barrek-tre e-keñver ijinouriezh, ober o zamm labour : er bankoù, kevredigezhioù-kreataat, labouradegoù ar bed ez eus bremañ 450 000 ordinator. Gant ur benveg elektronek o kous-tañ war-dro 3 000 lur e c'heller, dre implijout rousedad ar pellgomz, anavezout kevriñoù-arc'hant ar bankoù bras. An ordinator a c'hell bezañ roet dezhañ an urzh da baeañ arc'hant ha goude an urzh da ziverkañ pep roud eus ar pezh en deus graet. Ar Stanford Research Institute en USA en deus studiet 700 laeronni dre ordinator ha sebezet eo bet an enklaskerien gant ijin al laeron giz-nevez. Ouzhpenn-se, pa glev renerien ur bank int bet laeret, e kavont gwelloc'h chom hep lavarout netra, gant aon e kollfe o c'hlianted fiziañs enno.

Un nebeut laeron a zo bet tapet. Unan en doa roet an urzh d'ur bank amerikan da baeañ ur million dolaroù en ur bank e Bro-Suis. Un eur goude e kemere ar c'harr-nij e New-York da vont da Zurich : tennet an arc'hant gantañ er bank, e prenas diamantoù evit ur milion dolaroù. E bal a oa degas an diamantoù en-dro d'an USA,

gwerzhañ anezho gant 20 000 dolar gounid, lakaat ar milion en-dro er bank ha reiñ an urzh d'ar c'homputer da zistrujañ pep roud eus an ober. C'hwitet an taol peogwir e voe kavet un diamant en e chakod gant ur maitouter.

Unan all en doa digoret, er bank e-lec'h ma labourer, ur gont dezhañ e-unan war an anv Zwicke. An urzh en doa roet d'an ordinator paeañ 10 gwenegad frejoù d'ar gont-se bewech ma vije kemeret nebutoc'h eget 10 dolar frejoù diwar gont ar praktik, haq un dolar pa vije ar frejoù en tu all da 10 dolar. Difazi e oa ar raktres. Kavet e voe al laer dre un degouezh souezhus : divizet o doa renerien ar bank ober ur prof d'an den kentañ ha d'an den divyezhañ, hervez urzh al lizherenneg, war roll o c'hlianted.

Kentañ a reer c'hoazh e peseurt doare e tibabas un implijad talvezout d'e renerien an droug -gwir pe faos- o doa graet dezhañ : enskrivañ en ordinator ar raktres a ziverke evnor ar c'homputer. N'hellas ket mul al labouradeg kas faturennou d'he c'hlianted. Lakaat a reas un embann er gazetenn da c'houlenn ganto paeañ. Gwall nebut anezho a reas ha serret e voe an ti.

Ha neuze : hag en n'hon eus ket klevet e oa servijoù 'zo eus ar stad-c'hall o lakaat war ordinator anvioù an holl ? Plijadur a vo c'hoazh, emichañs.

Per DENEZ



28

## al liamm

KELAOUENN LENNEGEL

BEP DAOU VIZ

RENER : RONAN HUON

Barzhonegoù, Kontadennoù, Skizadennoù.

KOUMANANT : 50 LUR

Per Ar Bihan, 16 st. Fours à Chaux  
Sant-Servan - 35400 SAINT MALO -

## dazont

Ar gevredigezh DAZONT, krouet nebut 'zo, a zo o vont da sevel ul levrig : Roazhon hiziv, hag a vo kavet ennañ roll an holl straedoù e Roazhon hag he bannlev ; ur roll divyezhek e vo. Kavet e vo titouroù a bep seurt, talvoudus da bep hini a zo o chom e Roazhon, pe a dremen dre ar gêr-mañ evit un devezh pe ur sizhunvezh, chomlec'hioù e-leizh, ha niverennoù pellgomz : mererezhioù ar burevioù post, ar c'hoarivaoù hag ar finvskeudennioù, roll ar skolioù hag ar skolioù-meur, pelec'h kavout ur sportva pe ur sal d'ober mellzorn (handball), chomlec'h an ospitalioù hag ar c'hlañvdiou, ar miridiou, ar c'hirri-boutin, ha kement-se e brezhoneg. Ha marteze e vo kavet ur gartenn vrezhonek eus kreiz kêr...

Savet e vo an oberenn gant DAZONT, moulet (un nebut kantadoù) hag embannet gant AN AMZER.

Kaset e vo al levrig-se evit netra da holl goumananterien AN AMZER (kalzig e Roazhon, ivez da vererezhioù kêr (ar post, ar maerdi...), ha da embregerezhioù 'zo. Lennet e vo, servijout a raio...

Ar re a zo dedennet gant bruderezh da embann e-barzh al levrig-se, a c'hell skrivañ d'ar gevredigezh, pe da AN AMZER (2, straed ar Richardiere, 35100 Roazhon).

## .lagadlemm.

Televarnour pe skinvarnour zo ur vicher rouez ha kalet. Evit an abadennoù e brezhoneg d'an nebeutañ. Nevez 'zo en deus kredet DIHUN (rann vrezhonek ar gelaouenn BREIZH) goapaat an abadennoù skinwel e brezhoneg (pe gentoc'h divrezhoneg hervez DIHUN) a c'heller gwelout war FR3. N'eus ket plijet kement-se da implijidi 'zo eus FR3 war ar brezhoneg hag hen lavaret o deus war ar post bihan (ar radio e broudigeg) hag ar post bras (an tele e broudigeg).

Ret eo bezañ ur stourmer erret mat war e gador evit kaout ar galon da chom dirak e bost-tele da dapout teir munutenn amañ, ugent munutenn ahont. Deuet omp a-benn da welout lodenn gentañ ar pezh-c'hoari BITEKLE d'ar sadorn 22 a viz Meurzh da 1e30. Ne oamp ket er gêr avat ar sadorn war-lerc'h evit an tamm diwezhañ. Pennoù skañv ! met adskignet e vez d'ar merc'her (sell 'ta 1) da 11e30 (n'eo ket posubl) war A 2 (digredus !). Ouzhpenn dek devezh etre an div lodenn. N'hon eus ket gwelet an eil lodenn. Chomet omp da strañf er gwele ar merc'her-se, 2 a viz Ebrel, ha c'hwil 'oar, deuet eo an nevez-amzer, neketa. Ra daolo ouzomp ar maen kentañ an neb n'en deus biskoazh c'hwitet un adskin-gasadenn...

Forzh penaos ne vez ket roet ur vunutenn ouzhpenn m'eo merket d'an abadennoù brezhonek. Perak n'eo ket bet skignet BITEKLE en un taol ? Un eurvezh diehan e brezhoneg, evit ur wech. Nann. Ma vefe kinniget ur match rugbi displeget e brezhoneg deomp 'vefe ezhomm teir sizhun d'an nebeutañ evit gwelout ar match en e bezh.

Ret eo bezañ dilabour pe war e leve evit selaou an abadennoù radio war ar sizhun. Ha c'hoazh ret eo chom e Breizh-Izel, ha kaout an MF. N'hon eus ket ar chañs na da vezañ dilabour na da vezañ reteridi. Hag e fell dezho, eme Maï Begaraok, burutellat an abadennoù radio ha tele pa ne selaouont ket anezho zoken ! Pa n'o deus nemet ur skinwelerez gwenn-ha-du dic'hastet prenet e ti Emmaüs ha pa ne basont ket an tailhoù warni !

Ma, desket hon eus memestra en ur selaou "liou an amzer" - tremenet 'vez n'ouzon ket pet amzer o kinnig abadennoù da zont e-kerz an abadennoù brezhonek - desket hon eus eta e oa echu gant "pebr ha hollen" hag e teufe da vezañ dizale "mesk-ha-mesk". Un abaden disheñvel ha memes tra war un dro hervez m'hon eus komprenet ! Gwellet 'vo. En ur c'hortoz, setu un toullad talbennoù a ginnigomp evit an abadennoù da zont, peogwir e seblant bezañ ar c'hiz da seurt dibaboù : ki ha kazh, gwenn ha du, paotr ha plac'h, noz ha deiz, tamm-ha-tamm, te ha me, feiz ha Breizh, gwech ha gwech all, hag all hag all...

Karout a rafemp lavarout ur ger memestra diwar-benn an abaden skignet d'ar sul : "liou an amzer ha spered an dud" (talbenn orbibus ma 'z eus unan !)\* : klevet e vez n'eus forzh petra diwar-benn n'eus forzh petra. Ur meskaj spontus, tamm liamm ebet, na penn na lost. N'eus na fent, na siriuasted. Netra. War a seblant eo savet n'eus forzh penaos. Un aner e seblant bezañ evit an oberour. An abaden diene ha diamzeriet-se, heritoerez hini Charlez ar GALL gwechall gozh, ha na gendalc'h nemet dre voaz a zo deuet da vezañ un tech fall.

Mezh o defe evidomp amatourien ar skinembann kuzh, 'giz re Radio Glas Fessenheim (gwelout AL LANV niv. 1) ma klevfent ur wech "liou an amzer". Dre eurvad ne ouzont ket ar brezhoneg.

Pounnerglev ha Lagadlemm

(\*) e galleg : "Coloration météorologique et psychopathologie des masses". (trugarez da Yod-Kerc'h)



29

## impalaerez ar blues

E 1923 e voe embannet evit ar wech kentañ ur blues gwirion war ur bladenn er Stadoù Unanet. Ur vaouez an hini eo a oa c'kanañ : Bessie SMITH. Lesanvet e veze "The Empress of the Blues" ken brudet e oa he doare da ganañ ar blues e-doug ar bloavezhioù 20.

Ganet eo bet Bessie SMITH en ur familh eus ar re baourañ, e miz Ebrel 1898, e Chattanooga, Tennessee. Ne oa ket dek bloaz c'hoazh pa ganas evit ar wech kentañ e c'hoariva kêr. Tremena reas he bugaleaj e maezioù don an Tennessee, tost ouzh harzoù stad Georgia, stre paourentez an tiegezh hag un nebeut abadennoù e salioù kanañ ar vro. E 1917 e tivizas kuitaat ar gêr evel an darn vrasañ eus ar re a felle dezho bezañ kaner a vicher. Met hi, e-lec'h mont davet an Hanternoz evel ar re all, a drezas harzoù an Tennessee dre ar Su, davet Selma, Alabama. Goude un nebeut bloavezhioù eno, e krogas da veajiñ da vat : Cleveland, Chicago, Memphis, New Orleans. E 1926, e kane :

"Some people call me a hobo, some call me a bum  
Nobody knows my name, nobody knows what I've done."

"Tud 'zo a lavar ez on ur foueterez-hent, lod all n'on mat da netra, Den ne oar ma anv, den ne oar pezh 'm eus graet."

Kemer a reas ar paour kaezh Jack GEE da bried, unan didalvoud anezhañ a zivizas koulskoude dont da vezañ "manager" e wreg. Ne oa ket ur vicher evitañ hag eñ ne oa ket alies ouzh e vicher ! Ur c'hwitadenn e oa kement tra a glasko lakaat war-sav. Un dabuterez c'harv e oa Bessie SMITH hag evañ a rae gin e-leizh. Meur a wech e voe kaset Jack GEE da strakal brulu war vaezioù an Delta. Den ne oar hag-eñ e kavas brulu, met Frank WALTER a voe ar "manager" nevez ha kavout a reas abadennoù eviti e salioù kanañ brudetañ ar mare.

Allies e veze Bessie SMITH eilet gant laz-seniñ Fletcher HENDERSON. Un doare da ganañ dezhi hec'h-unan he doa, un doare da liammañ ar c'han blues gant ar sonerezh jazz. Koulz lavaret, e oa bet hi an hini gentañ da grouiñ an doare-se, anvet "Classic Blues". E-doug ar bloavezhioù 20, maredad he brud, e veze sellet

outi evel ar ganerez veur. Bez e oa koulskoude merc'hed all war al leurenn. Unan anezho, Ma RAINEY, ganet e 1886 e Columbus, Georgia a oa da vezañ arzourez vras ar blues pa zigreskas brud Bessie SMITH. Asantet he deus Bessie SMITH embann pladennoù gant unan all hepken eus kanerezed ar mare : Clara SMITH ("The World's Champion Moaner"), ha koulskoude, daoust d'an anv ne oa liamm ebet kenetrezo. Mervel a reas Clara e 1935, disofijet gant an holl. Bessie, hi, a oa disprizius awalc'h gant ar c'hanerezed all.

Digreskiñ a reas brud Bessie SMITH goude bloavezhioù du 1928-1929. Serrif a reas o stal an ties pladennoù ha tonket e voe kalz arzourien d'an dilabour, dres evel an dud all. Daoust dezhi bezañ ur ganourez vrudet, ne c'hellas ket adkavout labour pa voe dasorc'het arboel-lerezh ar vro. Gwerzhañ a reas madigoù ha chewing-gum en ostalerioù ha ne veze kinniget dezhi kontrad ebet, dre ma eve muic'h-mui. Kanañ a reas koulskoude e-barzh un nebeut kluboù e Harlem. E 1934, goude an abaden "Blues and Jazz Concert" e voe kinniget dezhi ur c'hontrad c'hwec'h sizhun er "Connie's Inn". Kement-se a roas kalon dezhi. Coulennet e voe c'hoazh evit ober ur film hag embann pladennoù all.

D'ar mare-se eo, pa oa-hi o vont da adkavout he brud kollet, e skoas ar marv. En ur vont da ganañ er Mississippi e voe friket he c'harr gant ur c'harr-samm, e Coahoma, d'ar 26 a viz Gwengolo 1937, abred diouzh ar mintin. GURVAN



Bessie SMITH

## GERIOU - KROAZ

JOB


kael 3



A-BLAEN I. Soner. II. Penn astenn ; amezeg SAM ; touet e vez. III. Pennoù bank ; rannig parrez. IV. bout tremenet ; krouadurien. V. Notenn sonerezh ; penn Seza. VI. Berig larjezañ. VII. broudañ kon tremenet ; legumaj soubenn mesk-ha-mesk. VIII. ger-mell a-c'hin ; galv aet da gelaouenn vugale. IX. kizellet er c'hoad pe er vein da skouer. X. reoù kêr ha reoù war ar maez a vefe ; rannig nac'h.

A-ZERC'H 1. Muziker. 2. frankiz euskarek. 3. ouzhpenn trawalc'h ; pennoù garzh. 4. eus bak-teri ; araz a-wechoù evit al listri (a-stlabez). 5. tamouezad. 6. Kaoc ; dibenn anv rusian. 7. ...raskas ar strad. 8. hini boued a zegas naon ; dic'hour oberiant tremenet. 9. groñ-jek ; ger-mell amresis. 10. ... zo re ; a-feson.

kael 2



## ar bed keltiek

LEVRIOU - PLADENNOU - ARZ KELTIEK

RENER : GWELTAZ AR FUR

2, straed ar ROUE GRADLON

kemper  
pgz : 95.42.82



ABADENNOU BREZHONEK

SKINGOMZ (MF BREST)

KELEIER - eus 7 e 20 da 7 e 30 ; eus 12 e 20 da 12 e 30 ; nemet d'ar sul.

AR SEIZH AVEL - eus 10 e da 11 e, d'ar merc'her.

MESK-HA MESK - eus 10 e da 11 e, d'ar gwener.

LIV AN AMZER - eus 11 e da greisteiz d'ar sul war MF e Breizh-Izel ; - eus 1 e da 2 e war OM.

SKINWEL (FR 3)


BREIZH O VEVAN - 1 e 30 d'ar sadorn - 11 e 30 d'ar merc'her (A 2).

NOZ VAT - 19 e 48 d'ar merc'her ha d'ar sadorn ; - 13 e 48 d'ar yaou ha d'al lun (TF 1 pe A 2).




# moskov 89 . sportoù nevez.

DIBRADAN MEDALENNOU




NEUIAL E GWAD AR POBLOU GWASKET

ARAOK NA VO  
KAOULEDET




REDADEGOU TANKOU  
ETRE MOSKOV HA KABOUL




BOUREVIAN

BRO ARCHANTINA NEUS NACHET  
MONT DA VOSKOV

n'omp ket prest  
ret eo deomp en em akvitaat  
c'hoazh



LAMMAT DREIST OBEROU AN  
DIGEVREDERIEN



KARGE DOULL